

BARR HEOL war Feiz ha Breizh



DOVE
DIWALL VA BAG

BADEZIAN T AR VAG

TRESADENN GANT MEHEUT EVIT A.GRALL

Niv. 65

MIZ Gwengolo

1970



AN DOKTOR ANDREV GRALL
(1905-1970)

1. Notennoùigoù war Feiz ha Breizh
2. Pennadoù an Aotroù GRALL
3. Lennegezh kannadig parrez (Koulmig ar Gindi)
4. Barzhonegoù
5. An alkoolegezh : kleñved ar gevredigezh
6. Levrioù nevez
7. Diwar-benn un nebeut anvioù
8. Keginerezh
9. Ur sell war ar yezh
10. Bro Gembre
11. Kelaouennoù
12. Barr-Heol
13. Pater noster

NOTENNOUGOU WAR FEIZ HA BREIZH

En ur wallenkadenn emañ an Iliz Katolik e Breizh. Ar studiodennoù graet ur pemzek vloaz bennak 'zo dindan renerezh ar chaloni Boulard n'o deus mui nemet un dalvoudegezh istorel, gant lakaat evel just e oant un doal-enn gwirion a-walc'h eus stad ar Relijion e Breizh. Rak kalz a cheñcham-antoù a zo bet abaoe.

Diouzh stad ar c'hloerdiou dreist-holl, hag ivez diouzh stad al leandioù karget da stummañ leanezed, ez eo anat emañ Breizh en ur wallenkadenn. Goude ma oa bet serret kloerdi bras Kemper warlene - 1969 - ha degaset ar gloareged da Sant-Brieg ha da Wened, setu tro kloerdiou Sant-Brieg ha Gwened o-unan, ha kaset e vo ar gloareged da Roazhon hag evel-se en em gavo badet e kêr-benn Breizh kloareged 5 eskpiti ; Roazhon, Sant-Brieg, Gwened, Kemper ha Laval. Eskopti an Naoned n'en deus ket kalz da welout gant ar peurrest eus Breizh, evel ma ouzer.

Anat eo ar fedoù, met evel just e vo klasket ba roet abegoù disheñvel d'an diskenn-se, hervez spered pep hini. Hep mar ebet ez eo diaes kaout un disklêriadur klok mat da gontañ an holl. Pep hini a denno dour d'e vilin. Lavaret e vo ned eo ket kement-se un darvoud breizhat, mar gallomp komz evel-se, met un darvoud hag a gaver dre-holl da heul ar bed nevez : diwar abegoù heñvel, efedoù heñvel, eme ar Filozofiezh. Posubl eo evel just. Bez' ez eus end-eeun un dra hag a zo anavezet mat : aozet eo bet an Iliz e Breizh, aozet stummidigezh ar Gloareged hag al Leanezed, aozet an Oberoù Katolik hep derc'hel kont eus Breizh -- hag ar Gristenion o-unan a zo bet e-skeud-se stummet d'o zro hep derc'hel kont eus Breizh, hep derc'hel kont eus ar gwirvoud breizhat, hep derc'hel kont zoken eus gwirioù Pobl ar Vretoned. Hag abeg a zo da grediñ en deus an dra-se sikouret gwanaat nerzh an eneoù. Un den dinerzhet en devez poan o 'n em zivall diouzh ar c'hleñvedoù. Evel-se emañ kont war dachenn ar spered.

An Eskibien, meur a hini anezho estrañjourien, darn zoken eus ar C'hreisteiz, n'o deus klasket abaoe rummadoù ha rummadoù, nemet stummañ an Iliz e Breizh, hervez patromoù Bro-C'hall ; mont a raent da Bariz da glask o menazioù hag o gerioù-stur, degas kañferañserien eus Pariz hag eus ar broioù-krec'h da ziskouez penaos edo an Obererezh Katolik da vezañ aozet e Breizh ; leuskel bommoù helavar a-wechoù diwar-benn Breizh hag ar Sent kozh (rak peurvuiañ ez eo an Eskibien tud helavar) da geñver Pardon Santez Anna pe Sent ha Santezed brudet ar Vro. Soñjal a rae ganto e labourent evit brasañ mad ar Feiz hag ar Relijion. Petra 'chomfe d'ober gant ar veleion ? Nemet diskanañ dezho en ur gomz en o samonioù eus ar Frañs divarvel, mont da vennigañ drapioù triliv ha monumantoù ar Re Lazhet er brezelioù, gant prezezennoù gallgar. Sellit, da skouer, petra a zo bet graet er bloaz-mañ e Santez-Anna-Wened, d'an 10 a viz Mae, war zigarez lidañ Deiz-ha-Bloaz an Trec'h e 1945. Treiñ a reomp diwar gannadig Santez - Anna (1) ar bomm-mañ : E gwirion-ez e lided daou ouel, e Santez-Anna, d'an 10 a viz Mae : ober a raed war un dro Deiz-ha-Bloaz

ez e lided daou ouel, e Santez-Anna, d'an 10 a viz Mae : ober a raed war un dro Deiz-ha-Bloaz an Trec'h e 1945 hag ec'h enored Santez Janed-Ark. Peurvuiañ e vez graet ar gavel-mañ diwezhañ en Iliz-Veur Gwened, d'an eil sul a viz Mae. Met en askont d'ar plegennoù e voe kaset da Santez-Anna, o kreskiñ evel-se, en ur stumm, sked al Lidet.
() Goude an oferenn e voe savet un ambrougdeg da vont da Vonumont evit re Varv, en ur ganañ ar c'hantik "Da vugale, O Breizh, 'Marvet' evit ar Frañs".

Deuet eo Santez-Anna da vezañ ur greizenn eus ar spered gall : Santez Anna, Janed-Ark, Drapioù triliv, Kevredigezhioù Patriotik. Ha petra c'hoazh ? Familhoù an F.L.B. aet da yun war Zouar Kêranna hag e dibarzh Monumont ar 'Vretoned Marvet' evit ar Frañs, o devoa bet an droed e 1969 da vezañ lakaet er-maez ha netra ken. Ha ger ebet na meneg war Gannadig Santez-Anna diwar o fenn.

Gant tud diwriziennet pelec'h ne vefe ket Relijion ar Vretoned ur Relijion diwriziennet

Beleien, leanezed, kelennerien, mistri-skol gristen o deus graet al labour a oa merket dezho da ober, hag a gave dezho e oa o dever seveniñ hep derc'hel kont eus ar gwirvoud breizhat sellet evel ur restad, un aspadenn eus an amzer dremenet, ha tanket da vont da get, traou o veritout a-boan un doerouennig e kom al lagad, ur siwazh bennak, un allas bennak, un "n'eus - mann - ebet - d'ober", un "evel - se emañ - lezenn - ar - bed". O lazhañ ar babl, o genosidañ ar vro, a-wechoù hep gouzout dezho, a-wechoù all a galon vat, ha dinec'h o c'houstiañs n'eus forzh penaos peogwir e raent gant onestiz al labour edont galvet da ober. Peogwir edont galvet da ober. Peogwir edont en ur stern merket dezho, o labourat. Pelec'h e vefent bet nec'het gant ar stummet evel ma oant bet ?

Ur wech lamet diganto o daoulagad breizhat, da lavarout eo pep doare-soñjal, pep doare-gwelout breizhat, e sikourent diouzh o gwellañ ober an tremen eus bed kozh ar spered breizhek da ved nevez ar spered gall. Kement ha ken bihan m'o deus lakaet da horjellañ diazezoù ar Gevredigezh Vreizhek ha da heul diazezoù ar Feiz.

Lavarit, mar kirit, n'eus liamm ebet etre an daou zarvoud ; met ne c'hellit ket nac'h ez int en em gavet war un dro. Ha mar lavarit kement-se en anv ar Sosiologiezh, neuze moarvat emañ ar Sosiologiezh o kemmañ he reolennoù hag he lezennoù evel an traou all.

Un ene yac'h, en ur c'horf yac'h, ur gevredigezh yac'h ha diazezet-mat, ur spered yac'h ha diazezet-mat, a ya, a gav dimp, asamblez peurvuiañ.

+

Bez' ez eus ur rummad tud all hag a seblant bezañ nec'het ivez : ar skolaerien ofisiel, da lavarout eo, ar re a zo dindan ar gouarnamant. Ken divarrek all da gompren pelec'h emañ an dalc'h, daoust ma welont ha ma risklêriont fraezh mat an droug hag an dizurzh a zo er vro. Emeur o tennañ

2

o bara digant darn anezho, gant ar c'hlasoù e skolioù 'zo, pe skolioù zoken o serrin. Ur c'hant bennak e departamant Aodoù-an-Hanternoz ha div wech mutoc'h e departamant Penn-ar-Bed, ma ne faziomp ket. En-dro da Lannuon, da skouer, skolioù Lanvezeg, Mantallod, hag ur skol war ar maez e Langoat, a zo bet serret ar bloaz-mañ.

Klemm a ra ar skolaerien dre ma rank ar skolaerien yaouank nevez-deuet eus ar Skolioù Normal, mar fell dezho bezañ mistri-skol, divroañ da gostez Paris. Abegoù tiegezhel, hep mar ebet, en a ra dezho klemm evel-se : kaout a reont diaes kuitaat ar vro, hag en em zispartiañ diouzh o familhoù. Ur santimant naturel-tre. Hogen dezho kaulz ha d'ar skolaerien brevez, e c'hellfe tud an Emsav reiñ an hevelep respont ha tud ar Gouarnamant :

-- "Daoust ha n'eo ket ho micher ober keodediz c'hall ? Ho Pro a zo e kement lec'h m'emañ bro-C'hall gant he banniel. Ned oc'h na divroidi nag estrenien nep lec'h ebet war zouar Bro-C'hall ; er gêr emac'h kostez Paris evel kostez Marsilha. Kargidi ar Stad a vez diblaset eus an eil penn d'egile d'ar Frañs. Ha c'hwï neuze ?"

Klemmoù ar skolaerien hag ar Sindikadoù n'o deus pouez ebet er c'heñver-se dirak ar gouarnamant. Marteze koulskoude ez eo mouezh ar gwad eo a ra dezho klemm evel-se : nemet ne anavezont ket ar vouezh-se a tonet eus don-danañ o gouenn. Ar re a ray dezho anavezout ar vouezh-se, kompren eus a belec'h e teu, ha petra emañ o c'haulenn diganto a ray ur gaer a labour. Terriñ ar stern, setu petra emañ Mouezh ar Ouenn ha Mouezh ar Vro o c'haulenn diganto. Neuze e vo tu da implijañ arc'hant ar Vretoned da sevel skolioù o klotañ gant ezhommoù pep bugel rak ne vo ket foeltret arc'hant o krouiñ bombezennoù atomel pe o terc'hel uhel enor ar Frañs.

Risklet eo Kudenn Vreizh da vezañ sellet evel ur Gudenn a Ekonomiezh ha netra ken. Den ebet ne lavaro emañ bleuniñ stad ekonomikel ar vro, rak en ur parezon trist emañ. Ha gwan-tre siwazh ez eo ar re a zo en ur stumm damofisiel karget da zifenn an Ekonomiezh-se, dreist-hall ar CELIB. Ha peogwir e venegomp gwander ar CELIB, daoust ha n'emañ ket ivez an abeg eus gwander ar strolladoù stag outañ, evel da skouer EMGLEO BREIZ, evit pezh a sell ouzh ar sevenadur ? Peurvuiañ ne vez nemet kaoz eus an Ekonomiezh gant tud ar CELIB. C'hoazh ur wech ez eo un dra gaer pourchas uzinoù, stalioù-labour evit ma c'hello ar Vretoned debriñ o bara en o bro, ha war ar poent-se emañ an hall a-du. Hogen ur riskl a zo. Sellomp, da skouer, ar pezh a dremen e Bro-Lannuon. Abaoe un nebeut bloavezhioù ez eus bet savet uzinoù. Deredet ez eus bet estrenien da labourat, evel sternourien, ijinourien, micherourien. O plantañ Bro-C'hall e bro Lannuon an hini emeur 'm eus aon. Ne lavaromp ket ez eo un dra fall kaout estrenien o labourat war zouar Breizh, na zoken, o 'n em ziazezañ evit mat dre mañ. Nann, gant ma teuit da vezañ Bretoned tamm ha tamm, bep ma'z aio an amzer war-raok ; evel ma vez kendeuzet tamm ha tamm e kement bro a zo an estrenien ; hag evel ma'z eus bet

3

c'hoarvezet e Breizh a-hed ar c'hantvedoù. Nemet hon eus ar gwir da gaout ar binvioù a zo ezhomm evit se.

N'hon eus tamm ebet c'hoant d'en em gaout er pleg m'en em gavas an Eskibien Vrezhon, e Breizh-Veur, e-tro ar bloavezhioù 602 - 603, pa zeuas sant Eosten a-berzh ar Pab da veveliñ an Anglizien ha pa glaskas skoulmañ emglev gant an Eskibien-se (pe pa glaskas o lakaat da blegañ en desped dezho).

+

- 1) Neuze : adurzhiañ gouarnamant an Iliz e Breizh : lakomp, lakaat da da glotañ an Eskoptioù gant ezhommoù ar Bobl ha n'eo ket gant departamantoù savet tost da zaou c'hant vloaz 'zo hervez stultenn Dispac'herien an amzer-se, hag hervez youl Napoleon. E-giz-se ivez e vo distakoc'h pennadurezhioù an Iliz diouzh ar gouarnamant.
- 2) Adaozañ an Oberoù Katolik diouzh ezhommoù Breizh.
- 3) Reiñ aotre d'ar Vretoned ha d'ar Bretonezed a zo en Urzhioù Relijiel, dreist-holl d'ar vrezhonegerion, da zistreiñ d'ar Vro : v. g. Jezuisted, Kabusuned, Frañsiskaned, Dominikaned hag all. Diouzh ret, kemmañ reolennoù an Urzhioù-se, war ar poent-se.
- 4) Adurzhiañ emzispieg reizh Ekonomiezh Vreizh, diouzh ezhommoù Breizh, ha neket diouzh ezhommoù Bro-C'hall ha hervez youl he folitikerion hag hec'h arc'hantourion.
- 5) Adurzhiañ ar Skolioù ma vo desket, stummet ha kelennet ar Vretoned yaouank evit Breizh, evit o lakaat gouest da gas en-dro war bep tachenn al labour a vank, da zegas en-dro prespolite er Vro ha joa-bevañ da Vreizhiz, ha neket stummañ tud d'o c'has d'an estrenvro da labourat.

Bez' ez eus kinnigoù all da ober evel just, met dija gant ar steuennig-labourioù emaoomp o paouez braslinennañ, ez eus peadra da boanial.

- (1) LE PELERIN DE STE ANNE, Mae-Mezheven 1970, niverenn 259, paj. 58-9. Teurel evezh ivez en niverenn-se ouzh ar Pennad kentañ o c'houlenn ma vo graet ur studiadenn hervez reolennoù ar Ouiziegezh war Istor Perc'herinded Kéranna. Ar menoz-se a zo mat kenan.

An Aotrou Andreu GRALL

Kollet he deus Breizh ha Breizhiz un den a dalvoudegezh gant marv an Aotrou Andreu Grall, mezeg-biologour, apotiker-kemegour, e Roazhon, marvet d'ar 17 a viz Genver 1970.

Ganet e oa Landivizio d'an 8 a viz Gwengolo 1905 ha war-lerc'h e studioù war ar medisinerezh e kemeras ur stal-apotikerezh en Normandia hag ur pennad goude e prenas ur stal-apotikerezh e Roazhon hag eno e tremenas e vuhez-labour penn-da-benn.

Bet eo barnour e Lezvarn ar C'henwerzh e Roazhon. Ne ouzon ket ha kontet en deus un tu bennak penaos e oa deuet d'an Emsav breizhek ; marteze eo bet a-viskoazh troet gant Breizh, hec'h Istor hag he madoù a bep seurt. Bet e oa ur pennad e penn Kelc'h Keltiek Roazhon, met skuizh gant an iriennoù a vez alies, evel m'emañ ar c'hiz, e-touez Breizhiz, e tilezas e garg ur 15 vloaz bennak 'zo.

Mignon bras e oa da Zom Aleksiz, abad Boken ; alies en em welent, hag e plije da Zom Aleksiz pa zeue da Roazhon, ober e ziskenn e ti an Doktor Grall hag e bried. Evit komz diwar-benn Breizh, hag evit kontañ e drubuilhoù, rak n'eo ket trubuilhoù eo a vanke d'an Abad Meur, hag unan eus e vasañ trubuilhoù a oa soñjal piv a gemerje e garg war e lerc'h, du-hont e-touez lanneieroù tosennoù ar Menez.

Etrezo o-daou o deus bet aozet kalz a gonferasoù diwar-benn Boken, ha dreist-holl war Jili Vreizh, beziet, evel ma ouzoc'h, en Iliz kozh an Abati.

Bep bloaz da geñver Gouel Sant Kaourintin, e teue Tad Boken da lavarout an Oferenn da Iliz Sant-Geman, dindan baeroniezh ar C'hardinal Roques ha pennadurezhioù kêr-Roazhon.

Meur a wech en deus lakaet pouez e bersonelezh da harpañ kaaz ar Vro ha kaaz ar yezh, hag en deizioù ma varvas edo o prientiñ un droiad-vruderezh gant kannad U.D.R. Roazhon, Cressard.

Menegomp ivez ar perzh bras a gemeras evit sikour Per Denez hag an Aotrou Bourgeois eus Foujeras, da renkañ ar C'hendalc'h Keltiek, e Foujeras, er bloaz 1968.

E di, e Roazhon, stradaed Maginot, a oa diskenn ar vroadelourien ha distank eo ar re eus an emsav ha n'o deus ket kejet gantañ meur a wech, pe bet degemeret en e di da bredañ ouzh e daol pe da lojañ en noz.

+

Barr-Heol avat a gall ivez unan eus e genlabourerion ouiziekañ. Gaude m'en devoa lezet e stal-apotikerezh evit kemerout e retred, e tivizas an Doktor Grall sevel pennadoù-skrid diwar-benn an traou a anavez e ar gwellañ, traou e vicher ha traou Breizh. Ne felle ket dezhañ da gentañ e vije bet lakaet e anv e traou e skridoù. Un tamm aon en devoa na vije ket degemeret ervat e bennadoù, en abeg d'ar yezh. Rak n'en deveze ket tu alies da gomz ar yezh, ha n'en em sante ket barrek-kaer

war ar skrivañ. Ha setu penaos en em gemere : ozoñ e studiadennoù e galleg, hag o zreiñ e brezhoneg ha neuze o degas galleg ha brezhoneg da bennskrivagner Barr-Heol, en doare ma vije sklaer-meurbet e venozioù, d'ar pennskrivagner d'ho lakaat en ur yezh reishoc'h, diouzh ret, ha netra ken. A-benn ar fin ne zegase mui nemet e vrezhoneg ha mat.

En dra-mañ c'hoazh e vo kavet war *V a r r - H e o l* e bennad diwar-benn Renan hag ar bedenn war an Akropolis hag a zo bet dilerc'het en askont d'al LEKSIONALOU embannet gant ar gelaouenn.

E-sell edo an Doktor da genderc'hel, nemet e voe sammet prim-ha-prim gant kleñved-ar-galon. Goulennet en devoa un oferenn vrezhonek evit e Obidoù, dre garantez evit e yezh, ha neuze dre na oa ket evit gouzañv an ofisoù nevez gallek na dreist-holl ar c'hantikou gallek. Hogen un oferenn teiryezhek an hini a voe : brezhoneg, latin ha galleg. An Aotrou Kalvez, rener *S k o l*, a lavaras an oferenn, an Aotrou Floc'h (Maodez Glanndour) a reas ur gaer a brezegenn e brezhoneg (gant un diverrañ hir e galleg). Un toulad mat a dud-a-iliz a oa en interamant, en o zouez an Aotrou Perrin, eskob kozh Arras, ur c'heneil bras d'an Doktor Grall. Plijet gant Doue ha Sent ar Vro reiñ degemer d'an Aotrou Andrev Grall ha konfortiñ e dud, e bried, hag e c'hoar-gaer, en o glac'har.

K l e r g

R E N A N h a g A R B E D E N N W A R A N A K R O P O L I S

Da Glaoda Barbotin

Kontet em eus dija (1) penaos en devoa Renan skrivet B U H E Z J E Z U Z gant liv ha war baper Tadoù Jezuisted Ghazir. Ouzhpenn, a lavaren en ur veuliñ e stumm-skrivañ kozhik ha dudius war un dra, e veze lennet atav gant plijadur e "Bedenn war an Akropolis" hag e "Eñvorennoù Yaouankiz". Ur souezhadenn dudius am eus bet o lenn en hevelep niverenn eus B a r r - H e o l, ar bedenn troet e brezhoneg gant an Aotrou Klerg.

Un dra a zo sur, divent eo bet dason ar bajennad varzhoniezh-se en stumm yezh-plaen. Embannet e voe da gantañ war "La Revue des Deux-Mondes" e 1876; da c'houde, sterniet evel ur berlezenn brizius etre div zonevell, e voe embannet en he furm beurglok en "Eñvorennoù Yaouankiz", e 1883. Ar Bedenn-se eo a voe dreist-holl ar pennabeg eus berzh-mat iskis an "Eñvorennoù" war dachenn al levrioù. Niverus ha stank e tevio an advouladurioù an eil, war-lerc'h egile.

Evit gwir, ampartiz Renan, evel hini Racine, a zo e-keñver ar yezh endeeun, un ijin dreist. Meizus eo skrid ar Bedenn, ger evit ger, d'an dud a zeskadurezh-etre. Diaester ar gerioù dic'hiz ne vir ket an nen da gompren an danevell. Homañ eo a laka lennerien ha selaouerien dreist-ni verus da estlammañ, betek reoù hag a zo treut o deskadurezh klaseel. Gwelet em eus e mirdi Renan, e Landreger, tud stumm izelek dezho, oc'h adskrivañ war dammoù paper komzoù engravet war bannelloù.

Herried Psichari, merc'h vihan Renan ha c'hoar Ernest Psichari, a gont en ul levr bennak pegen souezhet e oa en em gavet un devezh :

"E prenestr bras ur burev-beajoù, e karter an Opera, e tiskouezed doare ar Parthenon evit lakaat e spered an dremenidi ar c'hoant da breñañ ur bilhed-beaj. A-gleiz hag a-zehou e oa treset e lizherennoù kaer lodennoù (ar re vrudetañ) eus ar Bedenn. Ur Parizian hag a seblante bezañ un den eus ar werin, a chome eno dirak ar prenestr-meur. Evit ar wech kentañ, sur a-walc'h, e lenne al linennoù-se. Me 'doufe a-walc'h ne gomprenne na talvoudegezh HUGIE na hini PROMAC'HOS, hogen hejañ a rae e benn hag e weled e vuzelloù o fiñval."

An daolenn verr-se, kontet dimp hep ardoù, a ra dimp kompren penaos Renan, gant gerioù boutin, gerioù an holl dud, a zegas dre vertuz an implij kensonius a ra ganta, heklevioù souezhus hag a c'honez kalon ha spered an holl. Koulskoude, evel glizhenn pa sav an heol, e teuz va estlamm em c'hreiz, pa'z adlennan e-barzh an M.O.T. (Levr 5) ur bajennad -- brudet ma'z eus unan -- gouestlet gant Chateaubriand da Cynthia. Sainte-Beuve a lakae homañ er penn kentañ eus al lennegezh c'hallek. Hag ar wirionez a gredan a zo gantañ.

Edmond Bire, en deus kemeret e blijadur o lakaat keñver-ha-keñver an daolenn savet gant Renan, e vrudetañ hini "Nazared" hag ur bajennad gant Chateaubriand. Gant fent e kloz e bennad o lavarout ez eo "treut

ha sec'h stumm Renan. E daolennadur eus Nazared a zo ur bajenn tennet eus ur geriadur-douaroniezh.

Diwezhatoc'h e lavaro Barrès "Rust, blaz al levrioù warnañ, hegasus evel ur c'hloareg breizhat", en ur gaozeal eus Renan. "Ur beleg c'hwitet" a raio Narsis Kélien anezhañ... gant asant Renan e-unan, awir eo.

Pa oan yaouank, e veze kanet, war notennoù Reynaldo Hahn, ar varzhoneg vrudet savet gant Andreu Theuriet diwar ar Barrac'h (2), ar wazhig-dour a red e Roz-Mab-Hamon, e Louaneg. D'ar mare-se e oan studier. Lennet ha tañvaet em boa "Eñvorennoù Yaouankiz" Renan. O stumm eeun, flour, a gilhe ac'hanon. Ha koulskoude ar veskadenn-se savet en ur yezh plaen gant gerioù dianav -- ar re-mañ a-dra-sur heson-meurbet, met hermetek -ñ a lakae ac'hanon souezhet. Dre ar heklez sonerezhel tennet diouzh ar gerioù dic'hiz-se e veze tizhet an efed barzhonieel.

Al lodenn-se eus ar Bedenn hag a gomz diwar-benn Breizh hag ar Broioù Keltiek a garge va c'halon a zudi. Hiziv c'hoazh ar meulgan d'ar varzhoniezh keltiek am dedenn hag a laka fulor em spered war un dro.

Bez' ez eus un dra hag a zo diaes da gompren, ha souezhus ivez : kaout ar Bedenn moulet el levrig etre "Merc'h ar Mekaniker-Lin" ha "Sabl Ronan". Da'm soñj - me emañ ar skrid-se en diavaez a-grenn eus "Eñvorennoù Yaouankiz" Renan. Penaos eta e c'hell bezañ moulet traou a tennañ da Vro-C'hres kichen-ha-kichen gant eñvorennoù bugaleaj Renan.

Mont da Vro-C'hres a oa, en amzer-se, un degouezh a bouez bras. Bez' e oa ar veaj-se ur berc'herinded da vammennoù ar sevenadurezh c'hresiat. Ne oa nemet ar skrivagnerien vrudet a gement a raë an droad-se. Dija a-raok Renan, en devoa Chateaubriand huchet en aner anv Leonidas, e-touez ar bodoù lore-roz, nepell diouzh Sparta. Kanet en devoa Lamartine savadurioù istorel Atene. Milliget en devoa Byron en e werzennoù ar vandaled a veze o preizhata ar c'hizelladurioù kozh e Bro-C'hres. Krouet e oa bet ur Skol C'hallek en Atene. Renan, eñ, a implijo e 1865 ur yalc'had-veaj evit mont da Vro an Doueed. 42 vloaz e oa. E-pad ar veaj-se eo e voe ragaozet dre vras "e baperenn". Ur mirour touet e oa hor skrivagner e-keñver skridoù ha brouilhadoù. Serret e oa e baperenn war an Akropolis en ur c'holoenn-lizher da vezañ tastonet, lipet hag adlipet hep ehan ; hag ar c'holoenn-se e veze d'e heul atav, gant ar gerioù-mañ skrivet warni : "Barzhoniezh - Akropoliz".

Kenlabourat a reas Renan da "La Revue des Deux-Mondes" buloz, pennrener ar gelaouenn, a boueze warnañ evit kaout pennadoù-skrid. E miz gwengolo 1876 edo Renan o tremen e vakañsoù e Fontaine-bleau. Evit kaout peoc'h e kasas e "Bedenn" da Vuloz. Siwazh, ne c'helle

ket er stad m'edo bezañ embannet a-droc'h-trañch evel-se etre div eñvorenneus e yaouankiz e Landreger. Dav e oa dezhañ klask un digarez, evel pa lavarfen ur varrennig-a-unvaniezh etre an eñvorennoù breizhek hag an eñvorenne all-se tennet eus e veajoù da Vro-C'hres, e barr e oad. Neuze e rankas aozañ ur raktavar, hir a-walc'h, evit displegañ en un doare ampart ar perag eus ar vouldenn-se e-touez e rummad eñvorennoù-yaouank-

Met Renan a oa ur pec'her aheurtet ha kustum e oa eus ar seurt traoù-pleg. En e levr "Amzer-da-zont ar Skiant" skrivet e 1849, e kaver un danevell eus ur valeadenn en devoa graet pa oa bugel gant e vamm da barrez Plæraneg, e-kichen Pempoull. A-dra-sur edo an danevell-se da vezañ kentoc'h en e Eñvorennoù Yaouankiz eget el levr-mañ. Daoust ma oa bet skrivet e 1849 ne voe embannet an oberenn nemet e 1890 ; hag e-pad ar c'heit-se, e talc'has Renan, gant skoazell e geneil bras, Berthelot, da gempenn ha da adkempenn e labour.

Er studiadenn verr-mañ ne gomzimp nemet eus ar rannbennad o sellout ouzh ar broioù keltiek.

Er penn kentañ, Renan a ro da c'houzout, en un doare doujus, da Atena, ez eo a orin varbar, ha war un dro e ro un daolenn eus e vammvro hag eus e hendadoù. Da c'houde, e tegas da soñj, gant teneridigezh, eus e vugal-eaj kristen.

Start e krede ec'h aparchante e diegezh ouzh gouenn ar Gelted. En e huñvreoù romantel e lakae anezhañ da ziskenn diwar ar Gelted dispart kollet e broioù latarek, moarvat Bro-Geredigion (Cardiganshire) pe c'hoazh Bro-Hibernia. Dre un taol hardishegezh lennegel e vije bet douget a-walc'h da welout e hendadoù o verdeiñ gant Sent kozh ar amzer a-dreuz morioù an Hantemoz pellañ. Evel ur bugel ec'h estlomme ouzh traoù Sant Brendan ha sur a-walc'h ez eo aet dre e faltazi da heul ar Sant-se en e Imram burzhodus.

Met un dra zo anat ha sklaer, skrid Renan n'eo nemet un adlavaradenn kempennet brav, met treuzlec'hiet, eus e levr "Barzhoniezh ar Gouennoù Keltiek".

sant Brendan, war lestr ar Priñs Jerom Napoleon. Renan, hep risk ebet evit e vuhez, en deus staket ouzh an Douar Prometet, ouzh Inizi Lofoden, Feroe pe c'hoazh ouzh an Island.

Neoazh n'eus ket aze un abeg evit treiñ Breizh en ul ledenez eus an Hanternoz : "a vec'h ma'z anavezet an heol, ar bleunioù eo ar c'hinv-mor, ar bezhinoù hag ar c'hregin (!)", "luskellet e voen em c'havell, ouzh an
9 eñvor eus skarnegi war-neuñv, eus morioù latarek, heñvel ouzh loezh (!)".

A-wechoù, a gav din, e lennan amañ, en ur stumm adnevezet, I m r a m
San t Brendan, troet diwar an iwerzhoneg.

A-du a-grenn emañ gant al Lannoù, pa skriv e raklavar e Zouaroniezh :
"Evit ar pezh a sell ouzhin, morse ne adlennan hep sebez ar 'Bedenn war
an Akropolis'. Honnezh eo he deus roet krog un tamm bihan re vuan d'ar
gredenn ez eo ar Gelted tud al latar hag ar velkoni."
Lati, ar Braz, Ar Govig, Suarez, Menez, Savignon hag all o deus lonket
ar vojenn-se ha lakaet un toullad ripioù war c'horre.

Petra da lavarout diwar-benn e varsoñjoù relijiel? Netra souezhus aze.
Miret en devoa Renan, ha morse ne nac'ho an dra-se, hiraezh d'al Liderezh
katolik.

Lenn a reer en e levr "B e a j o ù" (paj. 36) "Hiziv em eus pedet. Penaos
e teuan a-nevez d'ar bedenn? Er vered; bez ur plac'h yaouank, va soñj
marteze em bije karet anezhi. - Pedit eviti. Añ ya, pediñ a rin evidout
ene flour. War va daoulin e kaezhis hag e lavarís pedenn ar gristenien.
Abae an amzer-se ez on kemmet. Adarre 'm eus aon, ez on troet e kristen.
En e "Ernest ha Beatriks" (p. 51): "Fenez em eus hunvree
en un devezh euzhus. En devezh ma vije aet ar Gristeniezh da get. An
islonk a zigore e c'henou da'm lonkañ, an douar ne oa muñ anezhañ dindan
va zreid. War-bouez un nebeud delioù eus ur wezenn e chomen a-istribit
a-us d'an islonk. Distagañ a rejont. D'an ampoent, ur brimbalerezh lizhin
a'm dihunus. Kleier-kêr a vralle goustadik hag a gane an eil d'egile. Er
memes amzer, e klevis kantikoù: "Consolatrix afflictorum, Virgo purissima,
Rosa mystica".

En e levr "P a t r i c e": "Atav ez on bet bomet gant ar Gristeniezh, ha
biskoazh n'em eus he c'haret ken start evel abae an deiz ma'z on paouezet
da vezañ anvet kristen."

Echuomp en ur lavarout en devoa Renan evit eured merc'h Roc'hgwenn, en
iliz Louaneg, eilet a-vouezh-izel, kanaouennoù al Lidoù-Sakr.

Da'm soñj en deus bet Berthelot gwashoc'h levezon warnañ eget e c'hoar
Herried. Berthelot ganet pagan ha savet a-enep d'ar feiz, n'en devoa ket,
evel Renan, da boaniañ evit en em zizober eus levezon ur stummadur
kristen.

Studiomp bremañ prim-ha-prim an anvioù istorel ha douaroniel a gaver el
lodenn gentañ eus ar B e d e n n.

E 1923, e skrive Jean Psichari, mab-kaer Renan, ne anavezet ket Renan
al lennegezh c'hresianek ha n'en devoa darempred ebet gant barzhoniezh
ar vro-se. Perak eta e skrive an den meur "Doveez da zaoulagad glas"?
Piv en deus desket dezhañ peseurt liv o devoa daoulagad Atena? Marteze
Byron, e "Childe Harold":

Come blue eye maid of heaven

Goddess of wisdom! Here thy temple was!

Pe c'hoazh Pausanias hag a lavar en e levr "Traou Attika": "Liv
glas-teñval an Doueez". (Ar ger glaucos a zo troet gant
glas-teñval) Met pelec'h eta en deus diskoachet an anvioù niverus roet da
Atena hag a weler evel bokedoù o vorellat ar Bedenn? Hep douetoñs ebet
en oberenn Grignault. Hemañ en devoa troet diwar ar germaneg oberenn
Kreuger "Symbolik und Mythologie". Renan ne ouie ket
anezhañ an anvioù disheñvel haq en e notennoù e fizie e Grianiault.
Evhemeris: diwar-benn an anv-se, en devoa skrivet Renan dija, e 1853:
Evhemeris ne wele en doveed nemet tud douelaet". Setu aze me gred un
damveneg eus "Buhez Jezuz".

E-touez Kimmeriz: e-pad pell amzer ez eus bet nac'het e felle da Renan
merkañ dre ar ger-se 'Kimmeriz' ar Vretoned. Hogen e levraveg Renan e
oa ul levr savet gant Ruelle; ha Ruelle en em harpe war Solin, un istorour
latin eus an trede kantved; hag hemañ a roe evel un dra diarvar e oa bet
douaret Ulyssos war aodoù Kaledonia, e penn uhelañ Breizh-Veur. Ha
kentañ annezerion Bro-Skos ha Bro-Saoz a oa Kimmeriz ha Kimbriz, emezañ.
Tule: un enezenn lec'hiet un tu bennak direis a-walc'h. Marteze Inizi
Ork'h (Orkadia), pe Shetland, Feroe, marteze Enez-ar-Skorn (Island).
Lamm a ra Renan war an dirested-se evit lec'hiañ Tule, e London. Na
petra 'ta.

Kaledoniad: eveljust, a glot gant Lord Elgin, ur Skosad. N'en deus graet
Renan nemet amprestañ an anv-se digant Byron. Hemañ a lavar "Blush
Caledonia! Such thy son could be!"

Amañ ez Renan da heul Byron, daoust n'eo ket reizh samañ pep tra war
chouk Lord Elgin, rak estreget hemañ en deus graet e rann eus pinvidigezh-
ioù ar Parthenon.

An hini kentañ a voe ur Venezia, Morosini. Er bloavezh 1687, e kasas da
Venezia talbenn ar Parthenon. Otto von Koenigsmark, ofiser dindan Voro-
sini, a raio evel e vestr; kas un tamm gantañ (Kopenhagen).

Ur gall, ar c'hont Choiseul-Gouffier, a zegasas gantañ da Paris, e 1874,
tammoù eus ar c'houriblenn (Louvre).

War o lerc'h e tevio ar paourkaezh Lord Elgin, ha war hemañ, en abeg da
Viron, e choma atav ar vezh hag an dismegañs. Dre listri, goude ur peñse,
e tegaso labourioù-marmor da Vro-Saoz (British Museum).

Bremañ e lezon gant ar ... geriadur ar blijadur da reiñ sklérjenn d'an
holl diwar-benn anvioù Atena. An anvioù dic'hiz-se a c'hellfed lakaet re
all boutin en o lec'h; sklaeroc'h e vefe an traoù; ya, met an aergelc'h
barzhoniel, muzikel ha kevrinus a yafe da get, ha ne oa aze ar pezh a
glazke Renan.

Divent eda c'hoazh brud Renan e-keñver lennegezh, e derou ar c'hantved-
mañ. Aotre a roe ar vrud-se da soñjal en devoa ar skrivagner ken brudet
lakaet dre skrid, en ur c'hoari, testenn ar Bedenn, du war wenn, pep tra
11 o tarzhañ diouzh e bluenn, hep ardoù, hep raskañ ger ebet.

Gallet em eus sellout pizh, n'eus ket pell, ouzh luc'hskeudennoù diwar vrouilhedoù ar Bedenn.

Spontet an bet. Gwelet em eus testennoù gant gerioù skrivet an eil war c'horre egile, barrennet, disverket. Linennadoù en o fezh, rannbennadoù klak, a-wechoù pajennadoù, a zo rasket, skubet. Stagennoù skrivet war gein ar pajennoù, a zo a-unan duet gant krouzadurioù ha raskadurioù. Chomet on sabatuet. Krediñ a raen e teue e draou gant ar skrivagner meur-se en un doare diboañ, aes, flour, un dudj.

Padal, war a seblant, en deus bet skrivet en ur bouezañ-dibouezañ gant ar brasañ evezh pep ger, pep pennad-frazenn, kuit da raskañ tra displijus ebet. A-wechoù, war am eus gwelet, ez eo ledanoc'h, brasoc'h ar reizhadurioù eget ar skrid kentañ. Ret e oa bet dezhañ klask, treiñ, ha distreiñ, domata, raskañ-diraskañ a-raok kaout ar gerioù resis o klotañ a-grenn gant e stumm-skrivañ. Evel ur jeu-a-basianted e oa al labour-se, hep mar ebet : ne veze stoufet an toulloù nemet bep ma veze bet kavet ar ger resis, ar ger nemetañ mat da vont en un toull goull bennak ; ha derc'hel evel-se.

eus un dra hag a chom, en desped da gement a zo bet skrivet ha lavaret : den ebet ne c'hell skrivañ er stumm ma raen Renan, nemet Barres e vefe marteze. marteze (Sellit ouzh : Eizh deiz e ti Renan). Ne oa gouest den all ebet da sevel ar Bedenn war an Akropolis koulz ha Renan, er stumm-se.

Evit pezh a sell ouzh danvez ha talvoudegezh ar skrid, petra da soñjal ? Setu amañ al Ernest Psichari war oberenn e dad-kozh :

"Skrivet eo bet gant ur spered untuek o c'hoari gant goulakadurioù. Pa welan ar Gristeniezh hag he deus kemmet pep tra er bed, krouet milionoù a verzherien, a werc'hezid, a sent ha n'eus a-enep d'an holl draou-se nemet goulakadurioù !"

Ha setu ivez va c'hlozadur din-me va-unan. Ne zeu gant Renan nemet martezeadoù ha goulakadurioù. A-nebeudouigoù avat, dre c'hoari fin ha brav ha gant soutilded e stumm-skrivañ e ro dezho a-barzh ar fin liv gwirioneziou anat.

Echuomp en ur venegiñ ar baperenn-mañ kavet e-touez skridoù all goude tremnavan Renan. Marteze ez eo bet kement-mañ soñj diwezhañ an den meur a-raok serriñ e zaoulagad evit mat :

"Ar gredenn relijiel a zo muioc'h ezhomm anezhi evit koshaat eget evit mervel. Gwelloc'h eo tristidigezh teñval an eur gristen eget an Netra. Gwelloc'h eo ganin chañs an Ifern eget an Netra."

Diwar gont Breizh avat, e c'hellan lavarout hep kaout aon da vezañ dislavaret ne grede ket Renan en adsav ar Vro :

"He gronnet en deus gant evezh el liñsel-limestra a gausk enni an doueed marv"

(1) Barres - Heul, niverenn 56.

Andrev GRALL

(2) Barc'h an hini a zistager : Koad-Barc'h.

VANITAS VANITATUM

Lavarout a rae ar gerioù-mañ alies pa gomzemp eus buhez ar c'hêrioù bras. Azezet e-tal dor e benn-ti brav dirak ar parkad lann e bleuñv, gwarezet e benn dindan ur mell tak plouz. Heñvel ouzh hini va zad-kazh gwechall. Marvailhat a roemp sioul. Komz a c'hellemp hep an disterañ urzh, o vont eus an eil kooz d'eben, mennoziou disheñvel alies o tremen eus an eil d'e-gile hag o lezel etrezomp ar pep priziusañ : an tav-mignonned.

O va Doue, Andrev Grall va mignon n'eo ket gwir, ne c'hell ket bezañ gwir n'ho klevin biken mui. Morse, mui ken bremañ, ne welin ho taoulagad ken don, ken speredek, ken birvidik o sell, o parañ warnon hag ho mouezh un tammig goloet o lavarout :

- "Frañseza, Frañseza, daoust hag echu eo "Kêrbenn" ?"

Ha pa respontis : "Nann. Ne c'hellan ket mont pelloc'h. Ne'm eus kalon 'bet ken. " Gourdrouz a raec'h gant kement a vlivder hag a dan. Kaer oa war ar varvskaoñ. Na pegen leun a beoc'h e zremm speredek. Morse a-raok, a gav din, n'am boa merzet ken spis, stumm karrezek ar penn. Penn un den eus bro Leon graet da zougen tag ledan ha lorc'hus "Landi".

Manet oa kausket. A vare da vare e lavaren dezhañ :

- "Met perak 'ta na gomzit mui ? Respontit din. Arsa, c'hwil atav ken prim ho teod."

Bez' e oan evel ur bugel dirazañ ; o c'hortaz anezhañ da sevel e valvennoù ; evit goapaat kerent, gant kement a fent. Ne c'hellen ket krediñ oa echu. Seblant a rae din edon o vevañ ur sorc'henn dic'hallus. An holl dud o deus e anavezet ken bev buhezek, ken leun a virvidigezh a gompreno. Seurt tud ne varvont ket ; mont a reont un deiz diwar hon tra, un tu bennak da veajiñ dre ar bed holl. Un deiz sur-mat e tistroant. Rak mervel...

Soñj am eus outañ o studiañ gwad ur c'hlañvour bras euc'h ar stal-apatiker-ezh straed sant Jerman. Bliu ur souezh evit un den ken postek. Prim e jestroù ha pervezh ur bam. Nijal a rae bepred tra-dro dezhañ divaskell wenn ar'sara'hir devet lec'hioù anezhañ gant a bep seurt trenkennoù. E lunedoù risklet war beg e fri, treiñ a ouie eno mibin ha skañv, o vont eus an eil studiadenn d'eben, aketus-bras dezho. Pa oa ootre da gomz e lavaren dezhañ :

- "Dooust ha jedet hoc'h eus an niver hent a rit tra-dro d'ar sal-mañ bemdez C'hoarzhin a rae o respont :

- "Va buhez eo al labour-mañ."

E skiant oa bras-tre. Deut da rouesat siwazh, en deiz a hiziv ar goustioñs a lakae en enklaskoù fiziet ennañ. Diwar-se, gounezet en doa kalz brud e-touez e genvreudeur. Chamet e vije en e labourva noz ha deiz kentoc'h eget reiñ d'ur mezeg un enklask diasur. Na pet ha pet buhez n'eus ket saveteet ? Rak, ma ne gave ket ar mezeg diouzhtu abeg ur c'hleñved, pe ma ne glote ket a-wechoù an enklaskoù gant soñj ar medisîn, Andrev Grall eñ a chome diblegus.

14 - "Furchit, emezañ. Prederiit donoc'h. Klaskit aketusoc'h. Sur an-me eus

ar pezh am eus kavet. "

Medisin oa eñ ivez. Hag unan gwirion. O krediñ eo korf mab-den ur bloc'h emzifenn dirak ar c'hleñved. "Ne c'heller ket, ne zleer biskoazh disañjal, o reiñ louzoù d'ur c'hlañvour, ez eo kement gwazienn, kement nervenn eus ar c'horf a vez louzaouet. "Koulskoude, sellit war ho tro bemdez, ha gwelit nag a bep seurt traou a vez lonket. Ar spont dirak an disterañ taal-paz.

Gouzout a rae Andreu Grall kanañ kaerderioù Breizh. Hag unan eus e boanioù brasañ 'zo bet gwelout diskar kened hor bro.

- "Sellit, emezañ ar fulor en e vouezh, petra 'maint oc'h ober c'hoazh Goude ar c'hleuzioù hag ar gwez, an dour bremañ. Kement stêr vihan 'ho kontammet. "

"Frañseza, sellit 'ta hor bro a vont e pilhoù hag e truilhoù en-dro deomp. Ar veleien. Gwelit anezho a tiskar pep tra, o teurel kuit eus an iliz, teñzorioù alies... Feunteunioù, kalvarioù. Piñsinoù dour benniget e greiz vaen. D'ar pilhaouer. Yezh Vreizh? Petra eo deuet da vezañ? Kalon he Ene Breizh? Echu int, echu. "

Respont a ouien d'am zro :

- "Ha pro a gemm, va hini ivez. Hor Breizh-ni a varv, gwir eo. Hini hor yaouankiz. Met dija ar vro-se, ne oa mui heñvel ouzh hini hor mammoù-ni. Se 'zo ar vuhez. Breizh hec'h-unan, hi a gendalc'h. "

- "Nann, emezañ. Rak pezh a welomp bremañ dirazomp ne c'hell mui levezonat an den breizhat evel a-raok. N'ankounac'hait biken, biken, eo graet, fesonet an den gant douaroniezh e vro. An dour, ar gwez, ar c'hleuzioù, an hentoù-don, an oabl zoken, se a-hed kantvedoù en deus graet ar breizhad. Bremañ petra 'fell deoc'h e teufe da vezañ nemet... ur rabod. O vevañ er beton, o vervel mouget ennañ. Ha gant an adframmañ-douarod. "

Treiñ a rae prim war-zu e wreg ken madelezhus o lavarout :

- "Janed, ro din ur werennad gwinn mat da zisañjal. "

Karout a rae an natur. Ar bleunioù. Al laboused. O ya. Lakaat a rae ar gaoz da devel tro-dro d'an daol vras e sal-debriñ e daol evit gallout selaou kan ar voualc'h. Kanañ a raen e liorz en deiz all. Met eñ ne gleva ket ken.

Ar gwez ivez a gare kalz. Plantañ gwez o doa graet tro-dro dezho er bloavezhioù diwezhañ, e wreg hag eñ. Karantez don en doa evit Breizh-Uhel, eñ, ar "julod a Leon", 'vel ma karen-me goapaat warnañ a-wechoù. Div-izet en doa bezañ douaret e Roazhon. Heug en doa kemeret ur spont ouzh tud e vro.

- "O lezel he diskar, emezañ, evit reiñ ganti tachennoù brezel. "

"Pa gouezh an noz war maezioù Breizh-Uhel daoust ha ne gavit ket hoaluz an tachennoù glas a sav tro-dro dezho ar c'hantadoù "Ragos"?

- "Nann, a responten neuze. Kavout a ran ar gwel-se trist ha melkonius. Re vreizhuhelat evidon. "

- "O fi, fi. Eweljust evidoc'h n'eus nemet ar mor hag a vefe kaer. Fi, fi, ne c'hellit ket zoken distagañ 'c'hwi' evel ar Vretoned all. "

Eo. Deut an da garout maezioù Breizh-Uhel gant ar parkeier "Ragoset" a c'hleuzioù. Evit pegeit amzer c'hoazh? An adframmañ douarod 'zo krog amañ ivez, o kinnig krouiñ an dezerzh.

Seblant a ra din p'en em led ar serr-noz, sioul ha peoc'hus, gwelout ar ragosoù-se o fiñval en aer c'hleeb. Tasmantoù an tadoù. Magn ha krommet. Klevout a ran anezho o kantañ istor ar vro-mañ. Mac'het. Mac'hagnet. "Ragoset". Met atav war-sav. Bev daoust da bep tra.

Desket don hon eus diganeoc'h kement a draou. Kement. Kement. Sebezus oa ho selaou o livañ Istor Breizh. Hini ar chouantelezh distreset ken euzhus hervez 'an implij' ma oa d'ober outi. Farsal a ouien-me d'am zro o klask ijinañ penaos e c'helle ho memor en em gavout difazi bepred e-touez seurt gouiziegezh.

Rak ho teskadurezh oa estlammus. Don. Ec'hon. Ha gwirion. Ken don ha ma oa ho karantez e-keñver ho mignoned. Petra n'ho pije ket graet evito? Niverus oant tro-dro deoc'h en iliz Sant Jerman evit ar c'henoavo diwezhañ. Iliz Sant Jerman enni relegoù d'Argentré. Labouret hoc'h eus gwarezet gant e skeud, un tregont bloavezh bennak. Konfortet meur a wech sur-mat o selaou sonerezh arem ar c'hleier. Lezet o deus goustad eurioù ho puhez trevellus da ziveriñ warnoc'h deiz ha deiz. Bloaz goude bloaz. Sonet o deus adarre evidoc'h pa oac'h o kuitaat da viken ar c'harter kazh ken tost d'ho kalon. Ur mor a girri. Meur a bolis d'o heñchañ. Hag ivez ur bobl tud. Lavaret ho pije me zo sur : Vanitas.

Goulnet ho paa un oferenn vrezhonek. N'eo ket bet asantet. Kanet zo bet neuze komzoù war sonerezh a lakae ac'hanoc'h e fulor ruz. Aatreet zo bet deoc'h daou gantik e yezh ar vro. An aluzen 'vez roet d'ar paour. Dres evel m'he deus ho pro ar gwir da gaout, na petra 'ta.

Dindan balz uhel ha ledan an iliz, hoc'h arched. Warni dispaket ur mell gwenn-ha-du. Hag e-pad un eur hanter, o pilpasat d'ho saludiñ ur wech c'hoazh, an engroez a salute ivez ho panniell.

Aet omp d'ho kas betek lec'h an diskuizh. An avel yen a sanke warnomp biraù sklaset. Sellet em eus an arched o tiskenn. Luziet eo bet ar funioù. Un den a rankas diskoulmañ ar gordenn. Ne felle ket deoc'h distagañ. Nag hon lezel. Hag aet omp... Ni eo hon eus ho du-hant hoc'h-unan-penn er yenienn hag en noz c'harv sklaset.

Echu. Echu. Da viken. Piv bremañ a lavaro din gant ur mousc'hoarzh goap-ous ken leun a vadelezh don :

- "Frañseza ar Ri. Azezit amañ. Petra hoc'h eus skrivet hiziv evit B a r r - H e o l ? "

Andreu Grall. Setu. Skrivet em eus, 'fi' 'wel. Hag ez eo leñvadenn griz va c'halon o lavarout deoc'h kenavo. O mignon mat, c'hwi 'wel am eus skrivet. O siwazh. Evit atav bremañ va c'heneil gwirion. Ken a v o.

F. K v e n d a l

22.02.70

16 Da Janed Grall, gant doujañs ha truez evit he glac'har. M. S. D.

O chom edo an Aotrou Grall, er c'harter eus Roazhon bet fiziet ennon, pa oan kure e Santez Janed-Ark etre 1932 ha 1945. Ha biskoazh n'oañ boa kejet gantañ e-pad an trizek vloaz-se.

Ha koulskoude nag a bet gwech am eus redet ha diredet dre ar valioù, straedoù hag hentoù-dall ar c'hornad, da welout an holl gristenien mat pe zigredenn, hag ivez an holl vrezhonegerien deut d'en em goll er vannlev-se eus ar gêrbenn.

Met setu, an eurioù gouestlet ganin da weladenniñ an dud a veze implijet gantañ da labourat en e apotikerezh e-kreiz kêr. Digoll a gaven o vont da saludiñ tud e wreg, a oa en o zi stok ouzh e hini : an Aotrou hag an Itron Chateau, hemañ maer Roazhon d'ar mare.

E 1946, pa voen anvet da berson e Baeleg-Hazou (gouez da Jeusset), 25 km diouzh Roazhon, e teuas da'm gwelout ur mignon din, brezhonegour ha kelenner e Skol-Veur kêr-Anjev) (bremañ emañ e Tad Lem.

Komz a reas din eus ur mignon dezhañ eus an Emsav : an Dr Grall, apotiker .

- Ne anavezet ket anezhañ ? Biskoazh n'ac'h eus e welet ? An holl vrezhonegerien hag emsaverien "in the world" o tremen dre Roazhon, a ziskenn en e di pe e stal-apotiker. Ma, biskoazh kemend-all. Gortoz, me a zegaso an Doktor amañ.

Hag e gwirionez, un abardaez eus miz gwengolo, p'edon o rastellat alezioù va liorz, setu an nor-dal o tigeñ hag un denledan a-walc'h e chok o tont etrezek ennon, ur beleg war e seulioù :

- An Aotrou Barbotin ? emezañ.

- Ya... betek bremañ.

- Penaos emañ ar bed ganeoc'h, Aotrou Person ?

- Madik a-walc'h, Aotrou 'n Apotiker, ha ganeoc'h-c'hw'i ?

- Va anaout a rit ?

- Ya... Pe gentoc'h, nann. Nemet em eus klevet n'eus ket pell diwar ho penn gant ar c'hreiz kañfard-se en em guzh a-dreñv ho kein. Prometet en devoa ho tegas betek amañ. Den d'e c'her eo bet. Pa soñjan n'em eus ket kavet an tu d'ho kwelout e-pad an 13 vloaz ma'z oc'h bet va farrezian er 'Chapel Boby'. Gant ar vezh.

- Ya, Aotrou Person. Met kent toullañ kaoz ganeoc'h em eus ezhomm da c'houzout petra a gav deoc'h eus soñj maer nevez Roazhon. Fellout a ra dezhañ lakaat delwenn ar Gwesken e logell an Ti-Kêr chomet goull abaoe Torfed 1932.

- N'eo ket Doue posubl, emeve diouzhtu, dichek a-walc'h. Ma teu da wir seurt tra, ne vo ket pell ma vo diskaret an trubard d'e dro.

- A zo mat, Aotrou Person. Gout a ouzon bremañ ez oc'h ur gwir Vreizhad.

Setu penaos e ris anaoudegezh gant an Ao. Grall ha penaos e ouezis-me ivez e oa anezhañ ur Breizhad penn-kil-ha-troad, hag un den plijus

war ar marc'had. Da c'houde, ouzh e zaremprediñ, ne voen ket pell a-raok meizout e oa anezhañ ivez un den a galon.

A-walc'h e oa mont tre e ti Andrev Gall evit kompren edad e ti ur Breizhad a spered hag a galon. Breizhek e oa kement tra a oa eno : an arbeuri, ar ginkladurezh, al livadurioù diniver sinet : M. Meheust, al levraoueg dreist-holl, nemet levrioù o tennañ da lstor pe da Lennegezh Breizh hag ar Broioù Keltiek.

Biskoazh n'en deus an Doktor kuzhet e vanniell. Didrouz ; met gwiroc'h hag efedusoc'h a se e veze e labour evit ar Vro. Deizioù an "Dieubidigezh", pa oa ar muiañ risklus en em ziskouez Breizhad, setu ar mare men em ziskouezas ar muiañ brogarour .

Eñ eo a lakaas Kelc'h Keltiek Roazhon, neuze en un enkadenn, da zibraañ a-nevez.

Nag a gelaouennoù en deus harpet ; ha levrioù 'zo na vijent ket biskoazh embannet e brezhoneg, mar n'en dije ket roet e skoazell.

Bep bloaz e vode brezhonegerien Roazhon, da geñver gouel Sant Kaour-intin, en Iliz Sant-Jermen, evit un oferenn war an ton bras, gant kantikoù, lennadenoù, prezegennoù e brezhoneg.

Breizhiz e-leizh, brezhonegerien pe get, skrivagnerien pe bolitikerien en deus disac'het, o kaout evito ur plas bennak pe ur vicher c'honidus bennak, a-drugarez da dud eus e anaoudegezh.

Bep tro ma veze anv eus sevel un abadenn bennak evit ar Vro, e Roazhon pe war-dro, ez eo eñ a veze pedet da gomezañ ha da aozañ pep tra. Ha dont a rae brav-tre a-benn eus an holl gefridioù fiziel ennañ.

E gwirionez e c'houlenne ket digant kement a lavare bezañ eus an Emsav. Fellout a rae dezhañ kavout en "Emsaver" meur a berzh-mat koulz evel den koulz evel breizhad. Kaout a rae dezhañ e tlee pep stourmer diskouez fraezh hag anat, e oa talvoudus evit ar gevredigezh dre ur vicher pe ul labour resis, ha barek da gemer pouez a-walc'h evit kaout levezon war e genvroiz.

Heugñ a rae ouzh kement tra a seblante bezañ farouellerezh pe demaji ; ha klemm a rae balamour d'ar furlukined ha d'an istrogelled re stank en Emsav hag a noaze ouzh kaoz Breizh.

Ar pezh a reas ar muiañ a boan da Andrev Gralleo an tabutoù hag an dizunvaniezh oc'h ober o reuz bepred hag atav etre ar Vretoned. Nag a bet gwech n'en deus ket graet trouz a-enep ar pennoù-m. (resped deoc'h) na c'hellont ket en em glevout, pa ne vefe nemet dre garantez evit ar Vro ; ar re gentañ, hervezañ, evit lakaat Breizh da vont d'an traoù.

Droukskoueriet e voe, evel just, gant ar rendaeloù hag an troioù ganas savet a-zivout doare-skriavañ ar Brezhoneg ; hag ivez gant " Trubarderezh ar Gloer ", da lavarout eo : kasoni pe diseblanted an dud-a-iliz e-keñver kudennoù Breizh, da gentañ ar Yezh.

Kalz a vad en devoa gortozet eus adsovidigezh abati Landevenneg hag abati Boken. Spi en devoa e vije bet an daou abati-se, div greizenn a

ha kristen war un dro. Skoazell en devoa roet evit se, dreist-holl d'an Tad Aleksiz Presse, e vignon bras... Siwazh.

Meur a wech ez eo manet Andrev Grall war e c'hoant. Meur a geseenn en deus paket. Re a dud, bet harpet gantañ, o deus ankounac'haet bezañ anaoudek en e geñver.

Un den a galon e oa ha krediñ a rae dezhañ e oa kont evel-se gant ar re all. Gouzout a rae degemerout an dud. Hag un dud e oa evitañ reiñ bod ha boued d'e vignoned niverus. Ur souezh eo penaos e tegase da soñj war ar poent-se eus doare an Aotrou Perrot. Derc'hel a rae start d'e geñver eiled hag e klemme pa ne zeuent ket aliesoc'h da c'houlenn herberzh digantañ.

Hag eñ " Paotr Landi " ma oa, e plije dezhañ bevañ e Breizh-Uhel peogwir e kendalc'he ar spered breton da chom bev ha don eno, - pezh veze lakaet gantañ war gont ar brezelioù hag an emgannoù renet war harzoù Breizh, gant hendadoù Breizhuheliz, evit difenn frankizioù ar Breizh. " C'hwï, emezañ, a zo ganeoc'h an Istor hag a virit soñj anezhañ. Breizhizeliz avat, a oa dezho ar Yezh hag emaint bremañ o koll anezhañ. Aesoc'h e oa dezhañ, e Roazhon eget e LANDI? Ezel e galon a vrogerour da dridal a-wel d'an holl, pa c'hoarveze un dra bennak evit mañ Breizh.

D'an 28 a viz Ebrel 1968, en noz ma lakaas paotred an F.L.B. tankardi kazarn " Bugale Mari ", e Sant-Brieg, da darzhañ, edon en ospital abaoe an derc'hent : hanter-faoutet va fenn, roget ur skouarn din, va javedoù a-dreuz, ha diframmet ur vrec'h din diouzh va skoaz... Donet a reas an Doktor da'm gwelout antronoz, an neuz warnañ da vezañ neket glac'haret, met laouen, hep gallout mirout outañ e-unan a c'hoarzhin, kement a fent a oa ennañ gant an " Torfed ". Da'm frealziñ e -kreiz dismantr va c'horf paour, ne gavas nemet ar gerioù-mañ : "C'hwï, da vihanañ, hoc'h eus un... alibi."

Rankout a ris er bloaz-mañ, e miz Genver, mont adarre d'ar c'hlañvdi gant ur c'harr-dorret, ha chom difiñv gant bragoù-plastr adal va zreid betek va begel. Div pe deir gwech e oa deuet Andrev Grall da'm gwelout. Ar wech diwezhañ e kavis anezhañ skuizh-meurbet. Fellout a rae dezhañ ez afen d'e di da beurziskuizhañ ha da beurbareañ, pa'z afen er-maez eus an ospital. Antronoz, beure-mat, e voe kemennet din, e oa aet da Anaon, sammet trumm gant an Ankou.

Heuliet em eus dre soñj obidoù va mignon, frealzet un tammig da c'houdé pa voe roet keloù din e oa bodet en-dro d'e arched goloet gant Banniel Breizh, e geneiled nesañ, holl vrezhonegerien Roazhon, hag ur mor a dud eus ar bed ofisiel pe get, da reiñ dezhañ an testen diwezhañ a zoujañs hag a garantez.

Bet on e gwirionez en e di, tri miz war-lerc'h evit peurbareañ, pedet ma oan bet gant e wreg a zo mignoned he gwaz mignoned dezhi hec'h-unan, hag a felle dezhi seveniñ c'hoantoù diwezhañ an hini marv. He zrugar-

ekaat a ran a greiz kalon. Rak e-pad ar peder sizhun am eus tremenet o hunvreal e-skeud gwez kaer liorz Andrev Grall hag oc'h alanan frond ar bleunioù-roz ken kaer a gare kement, oc'h estlamiñ ouzh e levrioù prizius, hag o selaou komzoù e dud karet, em eus hen adkavet hag hen anavezet gwelloc'h eget biskoazh. N'eus par d'ar marv evit diskouez an dud evel m'emaint hag evit aatren deomp kejañ ganto e gwirionez, a-benn ar fin, evel ma kane Gurvan hag Aziliz oc'h en em adkavout hag oc'h en em anavezout en tu all d'ar marv :

Eno, va c'harantez,
Eno en em gavimp
El levezet beuzet.
Eno, va levezet,
Asamblez e vevimp
Er aarantez teuzet.

Glaoda Jakez BARBOTIN

LENNEGEZH KANNADIG PARREZ

Lizher Ben-Yehouda

Yosef Ben-Sira eus Aleksandria

(Betlehem 25.XII.O.)

Peoc'h ha bennozht dit, Yosef Ben-Sira, ha'choñs vat a-berzh an Hellec'h-alloudeg, Doue Israel ha d'az tiegezh, ha mezh, dismegañs, disteñs ha marv d'hon holl enebourion ha da enebourion hon Gwir Doue (meñs tra vezo e anv da viken!).

Spi am eus ez a mat da gonsers ha da aferioù, du-hont en Aleksandria, e bro an dud pagan diamdroc'h. Amañ ez a mat-tre va c'hoñvers-meñs da heul Lezenn Impalaer meur ar Romaned, Aogustus, e talc'h an dud a-berzedek da Vetlehem ha da en em enskrivañ. Labour dimp eta ha ganet da heul an dremenidi. Met hep mont hiroc'h war an dachenn-se, reas an kontañ dit un dra evezek en em gavet amañ en noz tremen. Ne vi ket souezhet koulskoude, rak dre-holl e klever e tle ar Mesiaz en em zisklêzet er bed. Siwazh, n'eo ket ni a zo risklet da gaout ar c'hraou-se, rak d'eo kement a dud o deus klasket en em dremen da Vesiaz, ha n'eus bet met trubuilh da heul. Setu eta : en noz tremenet e oa pootred-an-deñved evel m'emañ ar c'hiz ganto o véso o loened war an tosennoù diwar-dro Betlehem, ha bremañ emaint e pep lec'h o lavarout o deus bet gwelet Aeled, hag ar re-gontant, o deus lezet o deñved evit mont d'al lec'h ma lavare an Ael dezho o e oa ganet ar bugel-se, ar Mesiaz, soñset. Ha kavet o devije an traoù just evel ma oa bet diqklêriet dezho : ur bugelig, mailhuret, gant e vamm en e gichen hag e dad. Ha biken ne vefes gouest da zivinout pelec'h. En ur c'hraou. Ma en dro-mañ e c'heller lavaret : setu aze ur Mesiaz kouezhet eus lost ar c'harr. Ha c'hoazh, pa soñjan, evel ma ouzomp holl, e tle ar Mesiaz bezañ eus Tiegezh ar Roue David, neuze avat. Tchet e vefen kentoc'h da gemer fent gant kozh kaozioù evel-se. Evelkent ha goude : Mab David ganet en ur c'hraou hag eñ Mesiaz. Te 'wel. . .

Piv a gredfe lavarioù tud dizek evel mesoerien-deñved ? Tud ha n'ouzont netra, na gomprenont netra hag a gemer traoù-noz evit Aeled. Tud evel-se n'int ket dellezek da welout Aeled ha da vezañ testoù ar Mesiaz. Ma vefe tud evel d'omp c'hoazh, tud desket ha pinvidik, mat, met c'hoazh ur wech, tud diste evel-se. Tud a-bouez evel d'omp a vefe kredet, met biken ne greda ar bobl ar sord'henoù a gonto ar bastored dezho. Ha neuze ar pezh a gont an hunvreerien ne glot ket gant ar pezh hon eus desket-ni a-vihanik e Lezenn Voizez : dant evit dant, lagad evit lagad. Evel hon tadoù kozh war ribloù stêrioù Babilon o respont d'ar re a c'houlenne ko-ou diganto e lavaromp : Evurus an neb a rento dit ar c'hemend-all eus ar pezh ac'h eus graet dimp. Evurus nep a dapo da vugaligoù hag a frailha o fennoù ouzh ar roc'h.

21 Ha setu, hervez ar bastored, e oa begadoù bras a Aeled a kanañ "Peoc'h

d'an holl dud karet gant Doue. " Ha ni neuze ar bobl dibabet ? Ar pezh a zo sur eo penaos biskoazh em buhez n'em eus bet gwelet un nozvezh ken brav, ken sioul, ken peoc'hus. Met 'vit pezh a sell ouzh ar Mesiaz avat. Brudoù evel-se ne vint mat nemet da sachañ warnomp ha war hon Bro fulor ha konnar ar Romaned. Ma ra zeuio buan ar gwir Vesiaz d'hon tennoñ eus daouarn an estrañjourien. Ar peoc'h dit-te ha choñs vat ez aferioù.

BENYEHOUA.

(Koulmig ar Gindi, 21.XII.1969)

Aleksandria en Ejipt Yosef Ben-Sira d'le vreur Ben-Yehouda. Setu dre un taal-choñs ur garavanenn o kuitaat Aleksandria evit Betlehem ha Jeruzalem hag e c'hellan respont dit diouzhtu. Mil bennozht dit evit da lizher hag ar bennozhtioù koer a oa ennañ. Lizheroù evel-se a ra plijadur e'z lizher, a greiz ma oa Merc'hed ar Bacc'hana lia o tañsal hag a tripal en ur ganañ a-bouez-penn en enor d'o doue BACCHUS "Evohe. Evohe. " e oa en em gavet en un taal hag a reas d'an holl chom sebedennet : paouezet ar ganadeg, tavet ar mouezhioù, sioul pep tra ; hag er gwez-palm-ez, evel e-kreiz an deiz, e oa en em lakaet an holl laboused da ganañ. Hag evit lavarout dit ar wirionez, me va-unan o oa bet sourprenet kement gant se, ma soñje din e kleven ar stered, e balz an Neñvoù, o kanañ an eil d'eben n'eo ket an "Evohe" millhet-se, met ar gerioù-se hag a ra kement a vad d'hor c'halanoù-ni : ALLELUIA, ALLELUIA. Ya, meuleudi, mil meuleudi da Zoue.

Soñjal a ri ar pezh a giri eus kement-se, ha va Jakaat a ri marteze e-touez an hunvreerien, ha moarvat ne vi ket pell diouzh ar wirionez, met me 'gont dit ar pezh on bet test anezhañ, pe ar pezh a soñj din bezañ klevet. Met traoù all a zeu ivez a-wechoù war va spered. N'anoveze ket porzh-mor brudet Aleksandria, ha n'ouzout ket petra eo bevañ e-touez Paganed, tud ha n'o deus ket ar c'hraou evel d'omp-ni da anaout ar gwir Doue. Klevet ec'h eus komz koulskoude eus ar Rouanez Kleopatra hag eus hec'h amourouzien, ar pennoù bras-se eus kêr-Roma. Ma, bez' ez eus kalz eus ar merc'hed hag a gemer skouer war Gleopatra. N'eo ket souezhus : en ur parzh-mor evel hemañ, ha martoloded o tegouezhout amañ eus kement bro a zo. Met trist eo hag e soñj din ne dleompket poufal kement-se, war zig-arez, ma'z omp-ni ar BOBL DIBABET. Te 'oar, koulz ha me, penaos Doue a zo Doue an holl dud, an holl bobloù, an holl ouennoù, hag a dle bezañ enoret, adoret ha pedet gante-holl. Ha neuze, amañ e reas PTOLEMAIS SOTER ar vadelezh-se ken bras d'ar Baganed, o pediñ ar SEPTANTA DEN (ar 70 den) da lakaat e yezh ar Vra-mañ, ar gresianeg, an teñorioù

a zo e Levr al Lezenn (Th o r a h). Ha perak ober kement-se ma n'eo ket evit reiñ tu d'an holl dud a volentez vat da servijañ ha da garout mestr bras ar Bed, Krouer Pep Tra. Ma vefes bet e-touez ar Baganed o vevañ evel don, az piñe komprenet gwelloc'h Kantik an Aeled hag a-du e vefes bet gante. Ma. Pegoulz eta en em gavo ar MESIAZ, an hini a vo sklêrijenn ha Salver an holl bablañ. Ha ma vefe e gwirionez ar BUGELIG-se ez eo bet ar Bostred o welout? Pa vo dibreset un tamm da labour, e c'helli marteze klevout hiroc'h ha degas keloù din. Da c'hortoz, plijet ganit, te Ben-Yehouda, va breur karet, ober va gourc'hemmoù d'ar tiegezh. Ra zeuio eta ar Mesiaz gant e Rouantelezh a Wirionez hag a beoc'h.

(Koulmig ar Gindi) 4.1.1970)

A - R A O K A R P A S K O U

Tud ar c'hoari : Madalenig (filhorez), Helena (maeronez) bet klañv.

Leanez bet oc'h ober ur bikadenn d'ar glañvourez, Augustina (amezegez).

MADALENIG : Kenavo, maeronez. Esperañs am eus e vefet yac'h ha santel ar a-benn va Fask kentañ hag e feufet d'ar Fouel. (Mont a ra kuit)

HELENA : Kenavo, filhorezig vat. A-benn neuze ez ay mat an traoù.

LEANEZ : Dleef eo d'ur vaeronez bezañ e-kichen he filhorez, deiz he Fask kentañ. Un toullad pikadennoù c'hoazh ha barrek e vefet

HELENA : Kaerañ gouel n'eo ket Gouel ar Paskoù kentañ. Soñj em eus

HELENA : Kaeroc'h eus va Fask kentañ. Gwisket-brav e vez ar c'hoazh evel pa vefe dec'h eus va Fask kentañ.

LEANEZ : Seder e vez o zal, kaer o c'halonoù. Komunian. Pedñ/En em ouestlañ d'ar Werc'hez ha gwelout e dud en-dro dezhañ.

AOGUSTINA : Ma, ma vijec'h bet o selaou an Aotrou Person disul, ha piñe klevet un dra iskis a-walc'h. War a seblant e ver o vant da ziskar ar Paskoù kentañ. A-benn dek vloaz amañ hag a-raok zoken, ne vo ket mui a Baskoù kentañ. C'hoazh e vez lavaret n'eo ket ar veleien a zo o tiskar ar Relijion. Me bepred ne gomprenan mui seurt ebet, pe dost.

HELENA : N'eo ket gwir ?

LEANEZ : 'M eus aon e ver paouezet e parrezioù 'zo e kostez Paris, hag en eskoptioù 'zo d'ober Fask kentañ ar vugale. Ha n'eo ket ar veleien eo a vez kaoz, daoust ma vez lakat kement-se war o chouk, met an dud o-unan. Tud ar vugale.

AOGUSTINA : Petra ? Tud ar vugale ? C'hwi a ya dezhi, ma Seur. Kontet en devoa an Aotrou Person istor ur paotr bihan o werzhañ e levr-ofereñs nevez d'ur c'hamarad- Pask dezhañ. Met kit da welout ha gwir eo kement-se, ha neuze n'eo ket war zigarez unan bennak e ranker skeiñ tout an traoù en traoù. Geo ?

HELENA : Augustina gaezh. Te 'zo diralllet adarre 'm eus aon. Ne gav ket deoc'h, ma Seur ?

LEANEZ : Kompren mat-tre a ran soñj Augustina hag a-du emañ ganti betek ur poent 'zo. Despetus ha despetus-bras e vefe gwelout kement-se amañ, met allaz. C'hoazh ur wech ez eo risklet bras an dra-se da erruout.

ha me 'zo sur, mar bije bet kavet un dra bennak all da lakaat e plas ar Paskoù, e oa echu gante abaoe un nebeut bloavezhioù.

AOGUSTINA hag ELENA : Ma, c'hwi a lavar traoù ; n'eo ket posubl.

LEANEZ : C'hwi 'oar a-walc'h koulskoude koulz ha me e chom ar vugale er skol betek 16, 17, 18, 19 vloaz hag ouzhpenn hag e tle o deskamant kristen mont da heul o deskamant all. Ha setu ma soñj gant an dud o devez graet tra-walc'h evit o sell an deskamant kristen, p'o devez lakaat o bugale d'ober o Fask kentañ.

AOGUSTINA : Ha goude, ken 'vit an deizioù d'an ofereñs ha d'ar peurest, se 'zo gwir evit lod. N'on ket evit nac'h, en dro-mañ...

LEANEZ : Ur seurt relijion a zo heñvel ouz ar pezh a reomp-ni soroc'hell em bro-me : ur c'hwetsegell gant piz kraz enni hag a vez roet d'ar vugale da c'hoari. Met poent eo din mont. Kenavo deoc'h ho-tiv ha c'hwi Helena, dalc'hit krog. Kenavo ur wech all.

(Koulmig ar Gindi, 21.6.1970)

GOUDE AR PASKOU

E ti Helena. Augustina un amzegez, Madalenig deut da dit he maeronez goude ar Paskoù. O c'hortoz tud Madalenig da gerc'hat anezhi e ver.

HELENA : Ret eo lakaat an traoù prest a-benn ma'z errua tud Madalenig. Augustina, hast buan skubañ an ti ha lakaat an dool prest ; Madalenig a sikouro ac'hanout da lakaat an asiedoù ha da darchañ ar gwer.

AOGUSTINA : Brav an traoù disul, disul, moarvat. N'ac'h eus ket kontet din c'hoazh.

HELENA : Ordinal e vez brav an traoù gant Paskoù ar vugale. Koant ar vugale. Kaer an ofis. Brav ar sarmon, hir un tamm marteze.

MADALENIG : An Aotrou Person a oa o sarmon. Me 'blij din klevout anezhañ. Komz sklaer ha fraezh a ra. Ha lakaat an dud da c'hoarzhin.

HELENA : 'M eus aon e oa kuzhet e vagnetafon amañ en ti, pa oa bet al leanez oc'h ober ur bikadenn din, rak kaz evel-se en devoa komzet, peotramant en deus bet lennet ivez K o u l m i g an 21.6.1970.

AOGUSTINA : Ret e vo din mont ur wech bennak d'e selaou.

MADALENIG : Kontet en devoa dimp berr-ha-berr istor ar Pab santel Pius X, savet eus ur familh paour ha deuet da vezañ Pab, Hennezh a gare ar vugale, emezañ, ha digoret dor an Tabernakl, da lavaret eo lakaat anezho da gomuniañ abred. An dud a c'hoarzh p'en devoa komzet eus mini-lost-ennoù.

AOGUSTINA (rust) : Lakaat an dud da c'hoarzhin gant se. Ma vijen me person, n'eo ket lakaat an dud da gemer fent gant se, mezh ne lavaran ket.

HELENA (gant duster) : Ma, Augustina gaezh. Te 'vez prest dalc'hmat da deurel tan ha moged. Ret eo kompren petra 'lavare an Aotrou Person. Ne c'heller ket leuskel gant ar vugale an dilhad o devez d'an oad ma reont a Fask kentañ, rak dambrest e vefent re verr, evel mini-lost-ennoù. Mesmes tra, emezañ, gant ar Relijion. Bez' ez eus tud hag a soñj ganto eo mat kemerout un tamm poan gant o bugale da lakaat anezho d'ober o Faskoù,

ha goude echu. Se 'zo ober gant ar Relijion ur Relijion vugale, ur c'hoari-veleien.

MADALENIG : Me 'oar penaos e lavare c'hoazh : Bugale, emezañ, a vez c'hoazh, met leanezed ne vez ket. Bugale a vez c'hoazh, met kristenien ne vez ket mui. Un dra bennak 'zo a-dreuz.1

AOGUSTINA : Te, Madalenig, a c'hell trugarekaat an Aotrou Doue evit ar c'hra ac'h eus bet da gaout tud evel ac'h eus.

HELENA : Kaer he deus kaout tud vat, e vanko dezhi dere'hel da zeskiñ he Relijion. N'eo ket a-walc'h kaout ur sakochenn ha mont d'ar skol evit deskiñ ur vicher bennak, ar penn-kentañ a cham : Karout an Aotrou Doue. Re dechet eo an dud da ankouaat an dra-se.

AOGUSTINA : Te bepred, Helena, a zo ur person market. Te 'oar sañs.

MADALENIG : Selaouit 'ta. Erru 'zo ur wetur (mont a ra da doull an ...)

Erru int, erru int.

(Koulmig ar Gindi, 5.7.1970)

MOUEZH AR VRO

An HEOL (o vont da guzh) : Me eo an Heol, mestr an Deiz hag ar Doulu. Ha da serr-noz an diwezhañ bro a saludan eo Bro ar Vretoned a-raok ... da gousket.

Ar MOR : Diwezhañ Bro a saludez ez eo va fried-me, o Heol, rak a-veze ... oazh ez on bet dimezet d'ar vro-se bet dezhi meur a anv : LEDAW, ARVOR, ha bremañ BREIZH. Gant va brec'hioù dour-sall e talc'hin betek fin ar bed d'he briata gant karantez. Me eo Skevent Breizh. Me eo Hent ar Vuhez hag ar Goñvers. Me eo Hent ar Prespolite.

An HEOL : Me 'oar gwiskañ ac'hanout, o Mor, pa'z an dreist linenn izelañ an oabl, gant livioù kaerañ Bed an Aotrou Doue. Me eo Mestr al L'VIOU. Kenavo warc'hoazh ma skuilhlin warnout ha war ar maezioù va sklêrijenn.

Ar MOR : Kenavo warc'hoazh e-keit ha ma vin-me o luskellat hunvreoù ar Vretoned. Gwir eo alies e vezan kriz ha digar en o c'heñver, pa c'hwezh an velioù, met daoust da se me 'zo evita ur Vamm-Vagerez.

Ar MAEZIOU : Mamm-Vagerez ar Vretoned ? Ha me ? Daoust ha n'eo ket ganin-me eo bet maget ha savet ar rumadoù Bretoned-se ken kreñv ha yac'h en amzer dremenet.

Ar MOR : En amzer dremenet ? Ya pa oamp hon-daou evel breur ha c'hoar o tougen darn an eil d'egile. Te o pourchas da vadoù ha me o sikour kas anezho d'ar broioù estren ouzh o dougen war va c'hein ledan. Dorn-ouzh-darn e rankimp labourat adarre a-raok ma savo adarre Pobl ar Vretoned o fennoù.

Ar MAEZIOU : Ni eo ar maezioù, ar parkeier, ar pradeier, al lenneier, ar c'hoadeier, ar gwazhioù-dour hag ar stêrioù. Ni eo baradoz an Douar. Met ar Vretoned a zo o klask e lec'h all o evurusted : krevier-lapined an H.L.M.-où, Trouzioù dinatur ar mekanikoù bras e-lec'h Muzik an Dour hag al LABOUSED. Maged ha teñvalijenn e-lec'h Glazur ha sklêrder Bed-an-Natur.

Ar C'HÊRIOU (sklêrijennet er serr-noz) : Ha ni neuze ? Daoust hag ez

omp-ni traou eskumuget ? Piv a bourchas labour d'an dud ? Piv a sav staloù-labour hag uzinoù ? Daoust ha ne vefe ket paourc'h ar Vretoned c'hoazh, ma ne vijemp-ni ket aze da zegemer yaouankizoù ha tud all koshoc'h ?

Ar MAEZIOU : Ni eo a bourchas ar Gwinizh, daoust m'hon eus nebeutoc'h nebeutañ an enor-se, ha setu perak ec'h ouzomp ervat en deus ezhomm an den a Vara hag a labour. Met kenkoulz all ec'h ouzomp ivez n'eo ket diwar vara hepken e vev an DEN. Rak an Den n'eo ket ul loen ekonomikel hepken, n'eo ket korf hepken. Ha mar trañ Va Bretoned e loened ekonomikel, mar debrñ o spered breizhat, mar grñ gante ar pezh a anver Robodoù pe un dra bennak evel-se, mar grñ tud desket gante met mar kollont o enor breizhat ne vint mui evidomp nemet bastarded. N'o anavezimp mui evel hor Pobl hag hon Tud.

Ar MOR (o trouzal gant karantez war an aod) : En em glevit ervat, Maezioù ha Kêrioù. Magit Bretoned yac'h ha me 'raio gante kentañ Pobl ar Bed.

(Koulmig ar Gindi, 19.7.1970)

M A E H O S A L U D M A R I

Eus daouzek maen ho kurunenn
O skediñ lINTRUS war ho penn
Mae ar bempet an emrodenn
Mae ho salud Mari

Dre vantell nevez ar c'hoodoù
Marelladur ar gwrimennoù
Dre letan flour an tiriennoù
Mae ho salud Mari

Dre geiz an neizhoù er sperm-gwenn
Nij ar gwennili 'us d'al lenn
Ar balanegi blev melen
Mae ho salud Mari

Dre ar bannoù-heol hag ar barrioù glizh
Sarac'h an delioù en o yaouankiz
Dre ar sev a goeñv garenn ar gwinizh
Mae ho salud Mari

Dre holl vleunioù frondus ar c'hloz
An avalenned gwenn ha roz
Dre aezhenn glouar ar serr-noz
Mae ho salud Mari

Dre ar menn an oan
An evned bihan
An holl vodoù glan
Mae ho salud Mari

Dre goak ar ra ha kri ar skrilh
Dre gan an adan er gwez-tilh
Dre zour an eien o virbilh
Mae ho salud Mari

Dre bep perlezenn
War geot ar bradenn
Fron al lireù gwenn
Mae ho salud Mari

Dre c'hrougous an durzhunell rous
Dre ar goulmig he mouezh voulouz
Dre drivli glan an amourouz
Mae ho salud Mari

Dre hiboud sioul an dourredenn
Hirvoud ar skluzioù en draoñienn
Hiraezh ar stêr d'ar mor divent
Mae ho salud Mari.

24 mae '66

N O Z I O U - G O A Ñ V

Tan an oaled a gan
Fulennoù steredheñvel o sevel
Dre gan du ar siminal
Trema balz veur he zachoù aour
Meurdezus an noz
'N he sioulded leungevrin
An avelig sîn o kuzulikat d'ar gwez
D'o diduiñ gant keleier an deiz
Keleier ar mor hag ar menez

Dre vurzhud ar gwagennoù
- O ijin Mab-den -
Sonerezh-hud dousik a floura va c'halon
Biniou-ilin ha mouezhoù gour
Gouezeled sart, buhezleun ha balc'h :
- Kan rinel ha laouen ur Bobl dieub -
Diveizus din o lavar... Hogen
E pep ger, e pep notenn
Emañ skeudenn ar Paotr a garan
Evel ur M a b.

11.03.70

B E N N O Z H D I T

Bennozh dit, Doue Krouer
Da vout tonket din bout ur c'houer
O, Mestr an Natur
Ac'h eus roet din an Eurvad
Da labourat a-gevret ganit
Te 'ro an douar, ar glav hag ar wrez
Me 'demz, a had, a c'hwenn, a eost.
Ha bez' eus war ar bed
Haeloc'h micher?
--- Dispriz kêriz a ra fent din
Pa gemeront ar c'houer evit ur paour lar
Hag eñ perc'henn da vil vragig aour
Hag e arc'hant o lintrañ

D'ar beureoù leizh
Wag veg pep geotenn eus e bradoù gwer
Morioù toc'had o wagenniñ 'n e dachennoù
Lennadoù emrodez ma kante e chatal
Ha hentoù ametist etre e barkoù
Dezhañ frond yac'h ha kanoù glan
Al laboused hag ar bleuñv.
Dezhañ froñj ar gwenan, sarac'h an deil
Yud ha boud an avel
Ha bolz divent an oabl stergannet.
O ya, Bennozh dit, Aotrou
Da vout tonket din bout ur c'houer.

24 meurzh '70

Anjela DUVAL

SKEUDENN A VARV

Estote Parati

Trist m'edon en deiz all, evel Doue Pleuveur,
'C'h is d'aveliñ va fenn er-maez, e-pad un eur.
O vennout disammañ va spered trubuilhet,
E klaskis ul lec'h sioul, ur saonenn dihentet ;
Dindan ur bod sperm-gwenn, en ur prad flour ha dru,
E c'hourvezis da lenn, o klask un tamm didu.
A-dost din ur wazh-dour, sioulik, a hiboude
En ur lipat ar geot evel dre garantez
'Us da'm fenn, 'n un dervenn, un evn a richane
O veuliñ e grouer 'n e stumm herrdañ m'halle.
Luskellet gant e gan ha gant hiboud an dour,
Va spered, pell diouzhin, 'nijas dibalamour ---
Kollet, hep gouzout din, ar sell diouzh an douar,
Edon o huñvreal, eurus ha dilavar.
An evnig a gane, ar wazhig a drouze,
Met o c'hlevout a raen en ur vro dizanve(z).

Kollet eta edon 'n hunvre gevrinus,
Pa zihunis spontet gant ur c'hlemmvan doanius ;
'Vel galv ur c'hrouadur o c'hedal ar marv.
Spouronet e savis evit sellout en-dro,
Pa welis ur sparfell hag he lagad ruz-tan
O sankañ he skilfoù e korf an evn bihan
A gane bremaik, lirzhin, leun a vuhez,
Disoñj mat, ar paourig, diouzh al loen didruez
O tarnijal en oabl, uhel, a-us dezhañ,
O klaska r gwellañ tu hag ar c'houlz d'henn tagañ ---
Al lapousig gwasket a glaske en aner

Diframmañ e gorfig diouzh skilfoù e dager.
Tikal 'rae truezus evit goulenn sikour,
Pe gentoc'h ar frankiz digant e enebour.
Siwazh, ar sparfell griz, ruz he lagad 'vel glaou,
A nijas 'vel un tenn, krog mat er pistiklaou.
Ouzh ar selloù kuzhet, evel pep torfedour,
E lazhas an evnig gant un taal-beg treitour.

Ar skeudenn a varv din 'kreiz va hunvre
A zegasas em spered melkoni adarre.
Edon oc'h eñvorin kaerderioù ar vuhez
Pa dremene 'us din an Ankoù didruez.

Evel-se peurvuiañ e tegouezh ar marv
Evel un torfedour, gantañ e falc'h garv
Da lemel e vuhez digant ar paour-kaezh den,
Pa vez stag-mat outi, disourti ha laouen ---
Heñvel ouzh al lapous, o kanañ war e skourr,
An den a red, gant herr, war-lerc'h ur vuhez flour,
War-lerc'h madoù lintrus ha plijadurezhioù,
Hep merzout 'mañ ar marv dambrest war e seulioù.
Un devezh marteze en deus c'hoazh da vevañ
Eñ 'n em gav divarvel hag e talc'h da ganañ.

30

MABIG EFLAMM

KLENVED AR GEVREDIGEZH

Trede Kendalc'h a -enep an alkoolegezh a zo bet dalc'het e Versailles d'an 23-24-25 here 1969.

Kalz tud a oa deredet, ur mil bennak a dud a volentez vat hag a fall dezho labourat eus o gwellañ evit kemer perzh er stourm. Heuliet o deus ingal hag evezhiek ar c'hentelioù, hraet gant tud a bouez bras.

Ar c'helaouennoù avat n'o deus ket graet kalz a vrud en-dro d'an deouezh nag ar skinwel, goude dezho bezañ bet deuet, ha filmet an traoù dreuz a-hed hag a-benn. Tavet he deus ivez ar skingomz. Abegoù o siñsied a zo aes da gompren. Spletusoc'h eo ober bruderezh evit an alkoolegezh ar stourm enep. Ar gouarnamantoù zo bet a-viskoazh re lent dirak menoz boutin ar bobl. Doujañ a reont ar bilhedoù voterezh, ha souzañ a re ar strolladoù-gwask. Ne vint gouest da netra efedus keit ha ma na vint ket kenteliat ar bobl, ha kemmet he menoz.

Pa vez votadeg, un darn vras eus an dud a chom en entremar. Ne vint o soñj nemet d'ar pred diwezhañ, diwar glevout kemennadurioù-votiñ, ar gnet gant strolladoù-kampi ha galloudegezhioù pouezañ. An darn vuiañ eus an dud a zo enep d'an alkoolegezh, met n'eus ket kalz, e-touezh ar 25 dre gant (25%) eus ar boblañs hag a ev dreist ar muzul hag a anzafve ez int klañv, pe war var da vezañ taget.

Talbenn ar c'hendalc'h a oa : "An alkoolegezh, kleñved kevredigezhel". Bez' e c'heller kompren ez eo an alkoolegezh ur c'hleñved degaset d'an den gant ar gevredigezh m'emañ o vevañ enni. Ha bez' ez eus anezhi ivez ur c'hleñved eus ar gevredigezh hec'h-unan. An alkoolegezh a zo eta kleñved ar gevredigezh a-bezh, ha war un dro kleñved an hiniannoù.

Diaes eo kenlakaat ar bern lakadennoù ha menozioù a zo bet roet deomp da brederiañ warno. Ar gwellañ a zo da ober eo ober un dibab, ha mont d'ar stourm, pep hini gant e ouest, e ouiziegezh, e berzhioù mat. Dre veur a du e tle bezañ kroget e-barzh ar samm spontus hon eus da gas er-maez eus hon bro. Evit studiañ kleñved ar gevredigezh e vo ezhomm tud a bep gouiziegezh : an istorour a lavaro deomp peur, ha penaos, ha perak eo deuet ar gevredigezh a-vremañ da vezañ klañvoc'h ha ma oa e-doug ar grenn-amzer gant al lorgnez.

Ar sakiologour, an ekonomour, an den a genwerzh, an ijinerezhelour, an douarc'hounezour, a ouezo da vat penaos e vez produet ar madoù, ha penaos penaos e vezont eskemmet, gwerzhet, ezhporzhiet, prenet, implijet, ha petra ober pa vo re-ampled.

Pa vez re a avaloù-douar pe a artichaod, ne c'heller betek bremañ nemet mont da deurel anezha e foz an hent bras, pe dirak ti an tailhoù. Pa vez re a win, ha pa vez ouzhpenn enbroet gwinn estren evit abegoù politikel, e vez degaset ar gwinn-se da Vreizhiz da evañ.

Stad an ekonomiezh, hini an arc'hant, hini ar gevredigezh, a rank bezañ kemmet, rak int eo a zo kiriek eus re-implij an evajoù alkoolek.

Ar politiker eo an hini a ranko degas ar c'hemm-se. Labour en devo, rak d'ar Stad eo ren pep tra evit mad an holl, ha gwelet hon eus gwander ar Stad dirak ar c'hevredadoù-kampi hag ar galloudegezhioù-gwaskañ. M'o deus ar c'hounideien-win, ar varc'hadourien-win, ar gafediourien, ar gwir da vevañ, ar re all o deus ivez ar gwir da vevañ en ur vro yac'h. Ha droed hon eus ivez da vevañ en ur vro ha na foran ket bep bloaz seizh liliard hanter a lurioù nevez evel ma reer bremañ evit paeañ koust ar c'hleñved, tra ma ne gouezh e kef ar Stad nemet ur miliard hanter a dailhoù war ar gwinn hag an alokool.

Al lezennour a c'hella gwellaat al lezennoù a ren holl neuzioù an alkoolegezh, dreist-holl e-keñver an dizarbenn.

Mar deo klask ar pare d'ar gevredigezh, mall eo ivez soursial ouzh an hinienn, ouzh an den. Un dlead eo da bep hini ac'hanomp plediñ gant ar re a zo o treiñ war an tu fall. Lavaret zo bet e oa an alkoolegezh kleñved an digasted. Ha gwir eo e chomer alies diseblant dirak an everien? Un dlead brasoc'h eo c'hoazh evit ar re o deus dre vicher, darempredoù gant an dud : ar veleien, ar vedisined, an dud a lezenn, ar re o deus implijidi dindano, ar skolaerien hag o deus da stummañ ar yaouankiz, hag all.

Un dra a zo da lakaat war wel : emdroadur ar justis. Ar justis a oa gwech-all tuet hepken da gastizañ. En amzer Fañch Kentañ e veze troc'het o divskouarn d'ar vezverien pa c'hoarveze ganto adfeilhañ. Bremañ emañ al lezennoù o treiñ war-zu an diwall. Komprenet eo bet ne servij skouer ar c'hastiz da netra. Kompren a reer ivez, pa gouezh un den, he deus ar gevredigezh he lod a giriegezh.

An hevelep emdroadur a weler ivez e kelennerzh an ilizoù. Ar pech'ed bras, pec'hed ar bed, an hini a endalc'h an holl bec'hedoù all, a zo an diouer a garantez e-keñver an nesoñ. Pep ezel eus ar gumuniezh en deus e lod a gablusted pa gouezh un ezel all. Kouezhañ a ra an den, peurliesañ, dre ziover a garantez hag a vignoniezh, ha dre m'he deus ar gevredigezh kinniget dezhañ ar fallagriezha da zibab.

Ar vedisined a wel el lonker, ur c'hlañvour ha n'emañ ket o c'hartoz kentelioù a vuhezgezh. Dav pareañ e gorf, ha goude-se kemer evezh ouzh e spered.

Ar c'hlañvour nevez-pareet en deus ezhomm bezañ skoazellet. Ar re wellañ evit e gompren a vo e genseured, stallet e breuriezhoù hag a zo harpet war ur feiz don, e-giz ar Groaz Aour, pe ar Groaz C'hlas, pe Buhez Dishual. Ar re-mañ o deus ur feiz ivez, hini ar gengarantez.

Reiñ da ur paour kaezh klañvour. Ha ne oar ket e pe lec'h mont, cham-lec'h ar vreuriezh, a zo lakaat anezhañ war hent ar pareañs. Pareañ un den a zo mat. Mirout na gouezhfe klañv zo gwelloc'h.

Ha peogwir e kouezh an dud dre zianaoudegezh, ez eo un dever evit ar re a oar, kelenn ar re all, dreist-hall ar re yaouank.

Kalz menozioù ha sifroù a zo da bennaouiñ. Setu amañ un nebeut e-touez ar re bouezusañ :

Ur soñjenn eus Saint-Exupery : " Ne garan ket pa vez mac'hagnet unan eus va faotred. "

An aotrou kelenner Kelling a lavar : " Kantreezh un den a sell ouzh an holl. " Pe c'hoazh : " Lorc'h a zo bet ennomp a welout un den o vale war al loar. Peur e teuo an deiz ma ne vo ket ken peadra da gaout mezh a vale war an douar. "

Hervez an aotrou doktor Aujaleu : reiñ louzoù d'un den klañv n'eo ket a-walc'h. Ret eo dezhañ ouzhpenn kaout skoazell a-dro-war-dro.

Evit an aotrou kelenner Robert Debré : dañjer a zo pa zeu an den da vezañ sklav e voazioù. An implij a-nebeudoù n'eo ket noazus, met a-ziwarre avat, e teu da vezañ drastus.

Ar menoz-mañ zo bet ivez lakaet a-wel gant an Tad Riquet. Hervez Sant Paol emezañ, an holl draou krouet gant Doue a zo mat. An implij anezho eo a c'hell bezañ fall. N'eus boued ebet hag a vefe da zisteurel, ma vez degemeret gant pedennoù-trugarekaat. N'eo ket ar gwin an hini a zo fall, met ar meziezh.

Hon aliañ a ra an Tad da heuliañ erbedadenn sekretourva eskibienn Bro-C'hall, pa c'houlennont, war-lerc'h hon Tad Santel ar Pab, ma vo lakaet diouer alkool ha butun e-lec'h diouer-kig an deizioù vijil. Ar biniñ-se ma vefe sevenet gant kalz a dud, a vefe ur skouer vat da reiñ kalon d'ar re o deus ezhomm strivañ a-enep d'o zech fall.

Mar taolomp ur sell war statistikoù an aotrou ministr Boulin, e welomp ez eus war gant a gaserengirri, 40 Hag a zo dindan levezon an alkool. Hag e-touez ar 40-se, 23 a zo aet dreist ar muzul merket gant an alkotest. Kresket eo an niver eus ar re-mañ eus 15 % etre ar bloavezhioù 63 ha 66. Kalz tud ne fell ket dezho krediñ er sifroù statistikel, ha dinac'h a reont an alkotest, en anv al librentez.

An aotrou kelenner Etienne Bernard a lavar ez eus bet e 1968 5 400 den o vervel gant an droug-skevent, da lavarout eo, div wech muioc'h eget e Bro-Saoz, ha c'hwec'h pe eizh gwech muioc'h eget e broioù an Hanternoz. 90 % eus ar re varv a oa dindan 40 vloaz, ha paotred 75 dre gant (75 %) anezho.

Un drederenn anezho a oa klañv ouzhpenn gant an alkoolegezh. Ar c'hleñved-mañ a zo kaoz ma teu ar c'hleñved all da vezañ dibareüs. Ar stourm a-enep d'an droug-skevent a dremen eta dre ar stourm a-enep d'an alkoolegezh.

Dav eo gouzout ivez : 25 dre gant eus ar re a ya da en em lazhañ, a zo klañv gant an alkool.

An aotrou J. Leroux-Robert a studi ar c'hriñ-bev. Amañ e kaver ivez merk an alkoolegezh, dreist-holl kriñ-bev hentoù uhelañ an analat hag ar goñ-boued, da lavarout eo : ar genoù, an teod, ar c'hourlañchenn, an treuz-gouzoug, ar gorzenn-voued. Kreskiñ a ra bep bloaz, abaoe 30 vloaz, niver ar re a varv gant ar c'hriñ-se, skoaz-ouzh-skoaz gant kleñved an avu. War ur gartenn e weler Breizh amañ c'hoazh er penn kentañ. Petra soñjal bremañ pa glever ez a an den, dre hent an alkool, da guzhat

en diavaez eus ar gwirvoud? Se zo bet resisaet gant ur gouennontour. An alkoolegezh a ya gant sevenadurezhioù an Heol, emezañ.

Ar Gelted a zo bet a-viskoazh, hervez ul lavar boutin, troet d'an evajoù mezvus. Se zo gwir hep mar, ha ma'z eus abegoù a bep seurt d'an alkoolegezh, bez' ez eus en o zouez hag a zo stag ouzh ar gettelezh.

Daoust hag emañ ar Gelted a-vremañ o klask mont er-maez eus ar gwirvoud, ha pa vefe dre hent an alkool?

Er-maez eus gwirvoud Descartes marteze, met piv a nac'hfe emañ en o

gwirvoud a-unan, pa gendalc'hont evel o gourdadou, da glask hent ar baradaz, bet klasket a-hed an amzerioù gant Peredur, Bran, pe Kandle.

An hevelep hent, kristenaet, eo an hini a glaske Sant Brendan pe Sant Maloù. Klasket a zo bet o dishevelebiñ. Erasmus a lavar ez eo mervel bezañ lakaet da vont da un dra bennak all. Klasket a zo bet o lazhañ eta, met o spered, hep gouzout dezho, a heuilh atav an hengoun.

Kultur ur bobl, he yezh, he meizadur, he faellegezh, a zo bet mouget, ha n'eus bet lakaet netra en o lec'h, nemet hent an alkool.

D'ar re o defe c'haont mont er stourm a-enep an alkoolegezh e Breizh, ez eo dav kompren ne vo graet netra efedus keit ha ma ne vo ket adroet da bobl ar vro-se hec'h anv, he fersonelezh, ha blaz he vertuzioù hengounel.

Petra ober bremañ neuze? Labourat pep hini en e gornig, saveteiñ un den amañ hag ahont, a vefe mat, ma vefe kalz a labourerien war an dachenn. Sevel un emsav dibar a vo gallus un devezh bennak marteze, p'o devo komprenet kalz Breizhiz emski antek ez a an efedusted d'ar re o deus an niver, an arc'hant, ha skoazell ar Stad. Mont er stourm, evel m'emañ, er framm c'hwec'hkognek, setu ar pezh a c'hellomp ober diouzhtu, rak zoken er framm-se, ez eus ezhomm stourmerien. Met mont e-barzh, avat, gant hor spered-ni, an hini am eus klasket lakaet war-wel. Paent bras eo deamp mont en-dro war hent mat hon hengoun, ha n'eo ket hini ar gwin nag hini an alkool.

15.11.69

Erwan ROPARS

MORVAN LEBESQUE: Comment peut-on être Breton? Ed. du Seuil. (1)

Embannet eo bet al levr e miz meurzh diwezhañ, 1970, ha diouzhtu eo bet gwerzhet mat. Holl gelaouennoù an Emsav (ha re all) o deus skrivet ha lavaret a bep seurt mad diwar e benn. Hep mar ebet, ez eo M.L. ur skrivagner a vicher, aes ha plijus e dro-blunn ha barrek war an donvez. Amañ hag ahont e weler un tomm lubanerezh bennak hag ivez un tomm aon da vont re bell; rak M.L. a skriv er gazetenn "Le Canard Enchaîné" hag a vez prenet gant 500000 a dud: neuze emañ dav bezañ war evezh, eneket a? Bremañ e fell da bep rummad en Emsav stapañ M.L. ouzh e gorre oz hag e veuliñ evel broadelour taer. Arabat bezañ touellet, rak ne guzh ket ar skrivagner e venozioù: federalour, met dreiz-hall socialist; e vitoñ ur Vreizh distag diouzh ar Stad c'hall ha na vefe ket ur vro socialist, ne dolvezfe da netra.

Arabat ankouazh en deus M.L. dilezet an Emsav e 1932 dre ma kave dezhañ n'edo ket a-walc'h eus an tu-kleiz: tu-kleiz a-raok Breizh. Ne lavar ket se ken dichek, nann, met skloer eo pa lenner pizh ar skrid. A-borzh ar fin ar pep talvoudusañ evidomp marteze n'eo ket ar pezh a lavar an oberour, met ken toc'h e anv e-unan, hag abalamour da vrud e anv e vezo dedennet miliadoù tud da bremañ al levr hag e vo an tu dispar da skignañ hor menozioù.

Daoust d'ar vad a zeuio da heul al levr ne c'hellomp ket bezañ penn-da-benn a-du gant M.L. Krignet eo e spered gant un enepkloaregiezh diremed. Ne vank gwech ebet da glask abeg en Iliz. A-wechoù e vez ar wirionez gantañ, met amañ hag ahont e lavar traou bugelel. Hervezañ e voe koset an Tad M-ner gant ar roue da Vreizh evit lakaat da gousket ar Vretoned dispac'het. Abaoe me ur a vloaz koulskoude edo an Tad Mat o prezeg dre Vreizh-lzel pa savas Reveulzi ar Bonedoù Ruz. En deiz a hiziv e kaver dereat gwelout ar beleg o vont gant un den kondaonet d'ar marv betek an dachenn ma vo lamet e vuhez digantañ; daoust ha ne oa ket mat ivez d'an Tad Maner bezañ gant ar re kondaonet d'ar marv evit o sikour da vervel. Un dra vat e oa a-hend-all labourat a-du gant ar peoc'h; ha mar ne voe ket fidel pootred-ar-roue d'o ger, n'eo ket dre foot an Tad Maner. A-unan gant M.L. e tleer keuzioñ dre m'he deus kollet Breizh meur a hini eus he ferzhioù keltiek dre labour ar Roue hag hini Roma e-pad meur a gantved. Arabat ankouazh evelata e chome bev buhezek e-pad ar c'heñt-se, en ilizoù. En amzer a vremañ se 'zo ur gant all.

O komz diwar-benn drouklazh Yann-Vari Perrot, e lavar M.L. en deus nac'het ofav ar Stourmerez-Kuzh bezañ a-du gant muntr person Skrignag. Hoapala, perak e savas kement a zroug e pootred-ar-Stourmerez-Kuzh pa voe adsavet ar Bleun-Brug e 1948; n'eus nemet lenn *Telegramme Breton* an amzer-se evit gwelout. Da c'hras Doue, respont kalonek an *Dr Liberal* a stoufas a genou dezhañ.

Ma vije bet deuet M.L., deiz Lun Fask 1969, da Skrignag, en dije bet gwelet al Lidoù-klemm aozet gant tud ar Stourmerez-Kuzh, war blasenn ar vourc'h, tra m'edo ar vroadelourien feal bodet en-dro da chapel Koad-kev, e-tal bez an Den-Meur Yann-Vari Perrot. Fellout a ra groll da bootred an Tu-Kleiz e pep lec'h rastellat evito labour ar Stourmerez-Kuzh, met neuze, evel just, n'eo ket aes d'ur broadelour breizhat eus an Tu-Kleiz bezañ ken c'hwezhet-se dirak drouklazh person Skrignag.

Meur a wech e kav abeg M.L. abeg en Istor. 'Darvoudennel': Istor ar Bobl, setu evitañ ar pezh a zo talvoudus. En em c'houlenn a c'heller avat, petra eo Istor ar Bobl ma elzer a gostez an darvoudoù hag anvioù an dud. Diaest re e vefe a-hend-all kompren an Istor-se. A-raok M.L. hag a-raok pootred Skol-Veur Roazhon gant o Istor Breizh, o deus La Borderie ha Durtelle de Saint-Sauveur danevellet buhez ar Bobl Vrezhon. Ret eo avat, menegiñ an darvoudoù kriz hag anvioù an dud o deus lakaet mesk ha strafuilh, pe degaset gwellañ en Istor-se: onez, netra da gompren. Gwazh-a-se mar deo dallet ur paotr poellek evel M.L. gant stultennig ar Skol-Veur ha marteze gant kleñved ar vrizh-demokratelezh.

Hogen d'ar sioù-se e c'hell al levr digeriñ a daoulagad da veur a hini. Ha gwell a se.

J. C.

(1) *Morvan Lebesque a zo o paouez mervel e Rio de Janeiro (derou miz gouhere 1970) gant kleñved-ar-galon.*

BREIZH, VISIONS D'HISTOIRE: plaquette 56 p., 21x27; 25 planches qt X.V. Haas & Herri Caoussin, embannet gant Melezoù Breizh, 55 rue de la Fontaine, Fontenoy-aux-Roses, 92 -- 24,00 F. E derou ar bloaz-mañ (1970) ez eus bet embannet ul levr, ker a-walc'h e briz marteze, met ken kaer ha ken pinvidik evit ar spered hag an daoulagad ma n'eo ket re ger. Fellout a ra d'an embannour, gant sikour 25 engravadur, taolennañ darvoudoù pennañ Istor Breizh. Ur skeudenn war ur bajenn ha da geñver ganti war ur bajenn all e kaver an disklariadur eus ar skeudenn gant gerioù dibabet e-touez skridoù ar varzhed, añ istorourien pe skrivagnerien all.

Gant plijadur e saouret kened arzel an engravadurioù gwenn war baper du. An arzour? X.Y. Haas, un Elzasad anezhañ hag en deus bevet meur a vloavezh e Bro-Wened, kement ha ken bihan ma voe gonezet e galon gant hor Bro. Arzour a dalvoudegezh hag a voe siwazh, seizet e zivesker. Aet eo d'ar Anaon, ugent vloaz 'zo, hag eñ yououank c'haazh (Doue d'e bardono.)

Danvez e labour a zo bet pourchaset dezhañ gant Herri Kaouissin; hemañ a verke d'e vignon an darvoudoù pennañ eus Istor Breizh hag e plede neuze gant an engravadurioù, tra ma veze dibabet an testennoù gallek pe vrezhonek gant Herri Kaouissin e-unan; testennoù plijus dineizhet gant ur mailh war ar vicher. N'eus ket ezhomm da lavarout e c'hwezhe dre an holl pajennoù ar spered hag an ene broadel. D'hor mena, un oberenn-dreist evit Breizh.

JULES GROS: Le Trésor du Breton parlé (2^o partie), DICTIONNAIRE BRETON-FRANÇAIS DES EXPRESSIONS FIGURÉES, St-Brieuc, les Presses Bretonnes, 1970 (E gwerzh el levraouegoù hag e ti an Ao. Gros, 22-LOKEMO)

Homañ eo an eil levrenn eus labour vras an Aotrou J. Gros war yezh Treger (1). Pal an oberour a zo diskouez petra eo ar yezh komzet, dre reiñ evel skouerioù, frazennoù ha troioù-lavar skeudennus, evit sikour ar re a zo distag diouzh ar bobl da anaout ar yezh wirion, ar yezh vev, ha sikour diazezañ ivez yezh an amzer-da-zont.

N'eo ket dastum gerioù dizanav eo a felle dezhañ ober, met diskouez ijin ar yezh komzet, ar stumm implijet gant ar vrezhonegerien evit displegañ a menozioù. Evel just, e-skeud-se, en deus dizoloet gerioù ha na gaver nec'lec'h ebet, zoken er geriadurioù klokañ, gerioù hag a ranko ar c'heriadurourien da zont sevel fichenoù evito.

Evit burutellat gant onestiz al levr nevez-mañ e ranker, na petra 'derc'hel kont eus pal an oberour. Ha mar bez kavet abeg en e levr, e vev en askont d'ar pal-se hag en deustrisshoet re e dochenn-labour, ha paour-aet an Teñzor dreist-priz koulskoude klozet gant karantez, posianted ha lealded en e oberenn gant an Aotrou Gros.

Lennit hag adlennit ar frazennoù dastumet ha renket gant an Aotrou Gros hag e klevot pobl ar vrezhonegerien o komz, evel m'eo deus ar c'hrao d'eo c'hlevout ar re a zo o vevañ en o zouez. Ar Bobl o komz, setu a c'hellfe bezañ un titl all da labour gaer an Aotrou Gros.

E-keñver gouiziegezh setu, d'hor meno, ar pezh a zo tu da damall d'al labour :

Ne gomzomp ket eus ar skritur implijet hag a ro alies un neuz iskis da c'herioù anavezet mat. Gwelloc'h e vefe bet derc'hel da skritur Vallee, hep mar ebet, mar ne venne ket an oberour ober gant ar yezh peurunvan.

1^o) Kentañ mank al levr eo bezañ roet ar gerioù en ur stumm ha n'eo ket hini Treger (a-wechoù koulskoude e verker doare ar ger e Treger). Da skouer : Degoueza (T. Digoueza). Koer a zo bet lakaat T. a-raok Digoueza, n'eo ket se tamm ebet stumm ar ger : digoueañ an hini eo e gwirionez.

2^o) D'an eil bezañ roet evel tregeriek gerioù ha n'int ket tregeriek er stumm m'eo c'haver el levr. Da skouer : kalonna (deroù-mat; dizro-mat e Treger Vihan) pa ne glever nemet kanella ha kanellañ.

3^o) E-keñver implij al levr e vefe bet kalz gwelloc'h merkañ da heul pep ger ar sturioù pe eilsterioù anezhañ, evel ma'z eus bet graet da skouer evit ar ger aotrou (paj. 22). Alies ovat e ranker lenn an ñestenn penn-da-benn evit kaout holl sturioù ur ger bennak.

4^o) Tu a vefe marteze ivez da gaout da lavarout war ar gerentiezh en deus lakaet an Aotrou Gros etre ar gerioù :

Da skouer : Giz : doare, neuz, boaz

Giz : (mont war e giz, etc.) dont en-dro, mont en-dro

Gwelloc'h e vefe bet skrivañ ar ger kentañ GIZ (gg.) hag an eil

KIZ (g.) hag ober neuze ar c'hemmadurioù rekis en ur lokaat un notenn pe un evezhiadenn bennak evel-hen : e Treger ez eo deuet ar ger KIZ da vezañ GIZ, evel m'eo deuet KENED da vezañ GENED, ha setu setu perak e kaver ar c'hemmadurioù-mañ : war e c'hiz (= war e giz) war he giz (= war he c'hiz), war o giz (= war o c'hiz).

Gallout a reer bezañ nec'het un tammig pa weler tastaet an eil d'egile gerioù evel struj (= doare, stumm, neuz) ha struj (= strouezh) p. 497.

A-wechoù koulskoude e seblant an Aotrou Gros bezañ bet levezonet gant ar yezh peurunvan ha roet en deus da c'herioù 'zo sturioù ha n'int ket sturioù ar gerioù e Tregerieg. Kemerit da skouer ar ger paj. 336 hag e lennot hervez urzh ar gerentiezh : Mamm, Mamm-gozh, Mamm-gun, Mammfùd-gozh.

Betek-henn setu penaos e oa evidomp an urzh-se : Mamm, Mamm-gozh, Mammfùd-gozh ha Mamm-gun. An urzh roet gant Jul Gros eo hini ar geriadurioù hag a seblant bezañ hini Bro-Leon da skouer, met n'eo ket hini Bro-Dreger. Marteze eo disheñvel an traoù e Lokemo, se 'zo posubl ovat.

Rak disheñvelderioù a gaver zoken etre rannyezh Lokemo hag an hini implijet da skouer en-dro da gêr-Lannuon. BOUED-ERC'H a skriv an Aotrou Gros, hag an dra-se a zo gwir evit Lokemo, hogen BOUEDERC'H eo a glever ivez. Merkomp zoken en ur dremen, e klever erc'h e Bulien hag erc'h e Kaouenneg.

FLEC'HAL (paj 62 n'eo ket brav mont da flec'hal da di an dud) : FLECHA L a glever ivez ha moarvat ez eo an hevelep ger.

5^o) Mat e vefe bet merkañ gwelloc'h dibenn ar verboù, evit diskouez spis an diforc'h etre an dibenn -añ hag -a pur. Dibenoù hag a vez mesket a-wechoù en anv-verb, da skouer : pesketa, pesketañ.

Hogen pec'hed e vefe kenderc'hel evel-se da abegiañ ul levr a dalvoudeg-ezh vras. Al levr n'eo ket klok ; an Aotrou Gros e-unan a oar se hag a lavar se ; hag ur wech bennak e vo tu da reiñ amañ un nebeudig troioù-lavar da verkañ un nebeudig gerioù boutin a-walc'h'koulskoude ha n'ema-int ket en Teñzor.

Gras d'an Aotrou Gros da reiñ dimp ar c'hentañ ar gwellañ an trede eus e levrioù evel ur gurunenn war e labour kaset en-dro gant posianted, lealded ha karantez. Rak ar yezh a zispak evel-se dirak hon daoulagad eo yezh wirion pobl ar Vrezhonegerien ; daoust d'an istitloù, daoust m'eo bet graet al labour e Bro-Dreger, gant un Tregeriad e-touez Tregeriz, ne zle ket bezañ kement-se a ziforc'h evit pezh an traoù-lavar etre rannyezhoù Breizh-Izel a-bezh. Gourc'hemenoù kalonek d'an oberour ha mil bennozh dezhañ en anv kement hini a gar ar yezh, dreist-holl ar re a zo troc'het diouzh ar bobl.

M. K.

(1) Gwelout Barr-Heal : Meurzh Gwengola 1966, paj. 30 Le Trésor du Breton parlé (1^o partie) : Le Langage

Gwenezan, Bolean, Trezelan, Plouizi, Plijidi, Plouzelamb

Bez' ez eus e Bro-Dreger un nebeut anvioù-parrezioù ha na seblantont ket bezañ bet disklêriet biskoazh. Hep mar ebet, e vank testenioù ha dielloù hag a rofe tu da ziskoulmañ ar c'hudennoù a sav diwar stumm an anvioù-se en deiz a hiziv. Dre-se eta, peogwir e vank dielloù kozh, ha kement hag adlañsoñ an enklaskoù e kinnigimp traoùigoù 'zo, met hep kaout c'hoant evelato da reiñ ar respontoù a zegasimp, evel gouiziegezh diarvar. Sed amañ an anvioù ez eomp da studiañ :

E kanton Bear : Trezelan, Gwenezan ha Bolean (Bodlezan) ha neuze e kanton Gwengamp an anv Plouizi, e kanton Boulvrriag an anv Plijidi, hag e kanton Plistin an anv Plouzelamb. Tennañ da darn eus hon testenioù eus labourioù war Sant Erwan ha Charlez Bleiz dug Breizh (1) hag an darn all eus hor faltazi harpet war istor Emardour ar Brezhoneg a-hed ar c'hantvedoù.

G W E N E Z A N : Unan eus parrezioù kozh Bear aet da ober abaoen an Dispac'h parrez VEAR a-unan gant Bolean (Bodlean) ha Lanneven. Abaoe un nebeut bloavezhioù 'zo ez eo stag ivez Trezelan e-keñver gouarnerezh ha mererezh ouzh parrez Bear.

G w e n e z a n eta : Patronez ar Barrez, Santez Jenowefa (Genovefa). D'hor meno keñveriañ Lannejen (Lann-wenezhen) e Kernev. Da dostaat an anv iwerzhoneg **F i n i t - G e n**.

T R E Z E L A N : Patron ar Barrez : Sant Riwald.

Diasterioù ; **Tre** : daoust ha tre(v) eo a zo er ger ? Ha kompren neuze : **Tre - S e l a n**, Marteze ; dav e vefe klask neuze piv eo ar **S e l a n - s e**. Taolomp evezh koulskoude e veze skrivet Trezelan er XIV-^{vet} kantved (2) tra ma lenner Tresizni (Trezeni, Trezini) hep kemmadur S/Z. Engortoz e vefed neuze da gaout Treselan, mar befe **S e l a n** an eil rann eus ar ger. Un dra amjestr-tre ez eo ar yezh evel just, riskl a vez atav o kinnig traoù ha n'ouzer seurt koulz lavarout diwar o fenn. Techet e vefemp neuze da lenn kentoc'h Trez-elanen ur gompren evel-hen : **Tre z** (Treth, Trezh, Treizh) ger anavezet mat ha neuze **e l a n** = youc'h yaouank. Cf Cwm Elan e Bro-Gembre. **Tre z h - E l a n** = Treizh-an-Elan ha netra ken ? **B O L E A N** (**B o d l e z a n**) : Patronez ar chapel (e gwirionez, iliz-parrez kozh) : Santez Dunvel.

Hervez ar stumm brezhonek ez eo aes-tre displegañ ar ger evel **B o d - a l L e a n** (= al leanez, e vel just). Nemet un ijinadenn ne deo ken, dislavaret gant holl stummoù ar ger en amzer dremenet ha zoken gant ar stumm "ofisiel" **B o d l e z a n**. E levr La Borderie (Santelezhadur Sant Erwan, pajennoù 142-143) e kaver **B o e i z l o h a n** ha kerent goude **B o e t z e l e h a n**. Hoger bezomp soñj e c'helle bezañ diaes a-walc'h d'ar sekretourien pakañ ervat diwar glevet, anvioù ar parrezioù a glevent, hag ouzhpenn levr La Borderie a zo bet graet, hervez un adskrid diwar Danevell

Gentañ ar Prosez. Dre-se ez eo arbat bezañ souezhet o welout gerioù skrivet en un doare iskis-tre. Diaes e vefe dielfennañ an daou stumm-se. Gwelloc'h en em harpañ war ar stumm ofisiel : **B o d l e z a n** hag ar stumm e brezhoneg ar vro ; **B o l e a n**, hemañ, anaf deoc'h, o tonet diwar egile, gant ar **Z** (dd, th dous) o kouezhañ hervez reolennoù Treger. Bodlezan = Bolean.

Setu perak e kinnigfemp **B o d - L e z a n** da lavarout eo, gant adsevel ar ger **B o d - B l e z a n** = **B o d - B l e d d a n**, **B l e d d a n** o talvezout bleiz bihan, bleiz yaouank.

B o d - B l e d d a n : **B o d**, repu, toull, faou ar bleiz yaouank, mar hoc'h eus c'hoant da welout er ger un anv-loen, pe marteze kentoc'h **b o d** an den anvet **B l e d d a n** (un anv-brezel bennak).

Ne glaskimp ket hirac'h.

E kanton Gwengamp, e kaver **PLOUZI**. Patron ar Barrez : Sant Pêr. O vezañ ma chom ar **Z** e brezhoneg ar bobl, er brezhoneg komzet, e sellomp ar **Z** evel un **S** kozh pe un **TH** kozh.

E Prosez Santelezhadur an Dug Charlez Bleiz e kavomp er bajenn 419 : **P l o e i z i**. Kalz a barrezioù o kregiñ gant **P l o u**, **P l e**, **P l e u**, **P l u**, a groge gant **P l o e** v.g. **P l o e b e z r** (**P l o e b e z r**), **P l a e l a n** (**P l o u l a n n**, **P l e l a n**) etc. Neuze **P l o e - i z i** pe **P l o e - i t h i** ? Gwall luziet eo ar stal. Diwbr ur stumm **P l o e - e i s i** (**e i t h i**) e c'heller kaout aes-tre **P l o e i s i**, **P l o e i t h i**, hag en ur vont pelloc'h : **P l o e - G o e s i** (**G o e t h i**) e c'heller adarre heuliañ istor emdroadur ar ger : **P l o e g w e s i** = **P l o e s i**, etc. **G o e s i** (pe **G o e z i**) a dalvezfe **g w i z i** (moc'h) pe gant klask ur wrizienn all **g w i z i c f**. **g w i z i e n** = **servijerien diwar gwaz** (?)

Hogen eeunoc'h kalz a zo : **P l o e G w e t h i** = **P l o e - g w e z h i**. **G w a z h i** o vezañ liester ar ger **g w a z h** = **g w a z h - d o u r** (2).

Ha perak ne vefe ket pa'z eus en tu all d'ar stêr, ur barrez all anvet **P l o u a g o r** (**P l o u v o g e r**) : **P l o e m a g o e r** (Prosez Santelezhadur Ch. Bleiz, paj. 169, 173 h.a.). Ne vez ket atav un anv-den goude **P l o u - c f**. **P l o u g a s t e l l**, **P l o u z i r i**, h.a.

Souezhus eo evelkent e vefe bet kollet-mik an hengoun evit **P l o u i z i** ha miret ervat evit **P l o u a g o r**. Met c'hoazh ur wech, da ziazez d'hon disklêriadur e lakomp ez eo kollet an alc'hovez evit kaout en un doare diarvar orin ar ger. Anez, tud evel **LOTH** ha **LARGILLIERE** ne vijent ket (e kement a ouzomp) chomet boud.

Ne ouzomp ket ha dereout a ra an anv a barrouz-gwazhioù da **Plouizi**, se 'zo afer an douaroniourien. Anavezet eo ar ger **R o u d o u r o ù** en antre Gwengamp, hag e-kichen Kernilien ez eus teir pe beder gwazh o kejañ an eil gant eben, da lavarout eo, tre war lez an hent kozh Gwengamp-Montroulez, aes-tre neuze da welout. Ha moarvat e oa brasoc'h **Plouizi** gwechall gant **Gras-Gwengamp** stag outi. Ha muioc'h a wazhioù neuze ?

PLIJIDI / PLEZIDI (kandon Boulvriag). Patron ar barrez : Sant Pêr. Ar stummoù kozh a gavomp e Prosez Santelezhadur Charlez Bleiz, paj. 89 : Ploesidii, paj. 267 : Ploezidi, paj. 337 : Plesidi.

Amañ ec'h adkavomp adarre kudenn kudenn an S-Z-TH. Troc'homp berr kuit da abuziñ hol lennerien. Gallout a reer kinnig : Ploesidi, Ploesidih, gant lakaat ez eus bet kollet un dra bennak etre an div rann eus ar ger, risklomp eta Ploesidi = Ploesidi = Ploesidi, liester Maeziad, diwar ar maez.

Plijidi : parrez an dud diwar ar maez ? Al liester IAT, (IAD) = IAT a gaved e brezhoneg kozh, evel m'henn diskouez labourioù L. Fleuriet. Drol a-walc'h ez eo, met ma welit traou all.

Ne glaskimp ket gant an S-Z = TH. D'al lennerien da ijinañ un draig bennak d'eo zro.

PLOUZELAMBR, e kanton Plistin. Patron ar barrez : Sant Silvestr, Jilvestr, Pab.

Amañ hep mar ebet, ez eomp da gaout ur gwall grogad. Meur e c'houlakadur a zevio d'hor skoazellañ.

N'eus ket ezhomm da vezañ gwall akuit ~~h~~ istor ar yezh evit kaout iskis dibenn an anv-se : Ambr. Hep mar ebet, ne deo ket ur stumm brezhonek. Hogen ur stumm koshoc'h d'ar ger a zo Ploeslemp. Amañ, d'hor meno, e c'hellomp kaout blaz an henvrezhoneg. (Daoust ma'z eus un diaester abalamour d'al lizherenn diwezhañ -P.) Ploeselemp a zo evel pa lavarfemp ur furmskornet. Skornet ? Perak ? Eno moarvat emañ an dalc'h, ha n'hon eus respont ebet da reiñ. Nemet mar en devije ar ger-se heuliet emdroadur naturel ar yezh hor befe bremañ moarvat Ploeslemp hag e vefe diskoulmet hor c'hudenn diboan-kaer :

Ploeslemp. An anv SELEV n'eo ket un anv dizanav, pell ac'hano. Klotañ a ra da skouer gant ar c'hembraeg kozh SELYF,

Goreu tridyn y dan nef
A werchetweis eu hadef
Pyll, a SELYF, a Sandef.

Gwellañ tri den edan an neñv
A ziwallas o annez

Pyll, SELEV ha Sandev. (Canu Llywarch Hen,
englyn 37)

Ur ger o tont diwar al latin SALOMO (3). C'hoazh ur wech perak n'en deus ket heuliet anv parrez PLOUZELAMBR emzisplegadur ar yezh ? Respontet neb a c'hello.

Ur roudennig eus emzisplegadur an anv-se evelkent a vefe tu da gaout en anv Sant Silvestr, patron ar barrez bremañ. Met ret e vefe gouzout istor an devoision d'ar Pab-se a-raok gallout en em arvariñ war an dachenn-se; D'ar furcherien merkomp c'hoazh un arroudenn all hag a gas kentoc'h d'un hent dall, a gav deomp : Gwelout en eil rann eus ar ger un dra bennak evel-hen : BETHELEM. Met tra-walc'h a draou diasur a zo dija er pennad-

mañ. Klozomp amañ eta.

K L E R G

- (1) a) De LA Borderie : *Monuments originaux de l'Histoire de St Yves, Prud'homme, St-Brieuc, 1887.*
- b) *Monuments du Procès de Canonisation du Bienheureux Charles de Blois, Duc de Bretagne, St-Brieuc, Prud'homme, 1921. Embannet gant Antoine de Sérent, O.F.M.*

(2) cf. kembraeg : gwythi, kemeveg : gwythy.

(3) Pe gentoc'h : *SALAMO ; cf SALAUN, diwar *SALAMON.

KEGINEREZH

A n A v a l o ù

Pa vez gwelet un aval da ouel Yann
Da ouel Mikael 'vez gwelet kant

Er bloaz-mañ maarvat e vo kont evel-se. Rak seblant un eostad mat a avaloù a zo el liorzhoù hag er beurjezoù. Ha gwell-a-se, rak petra 'zo gwelloc'h evit un aval mat, nemet un aval mat all.

Debromp avaloù eta hep damant. Vitaminennoù a zo enno, ar re A, B, C, dreist-holl er bluskenn. Gant al louzeier a vez implijet kalz amañ el liorzhoù bras e kav din eo gwelloc'h peilhat an avaloù a vez kavet er goñvers. Yac'hus eo an avaloù debret e kriz pe boazh ; mat ivez a c'hoñ ar boued, mat a-enep ar remm, an urloù, droug al lonezhi. An dud techet da lartaat a zo mat dezho debrñ kalz avaloù.

E-leizh a veuzioù a c'heller aozañ gant avaloù. Menegiñ a ran silzig gant avaloù, poazh evel just a zo anavezetoc'h marteze e Breizh-Uhel. Koulskoude am eus soñj mat bezañ bet debret silzig gant avaloù e Koadreven (bro-Dreger) en ur pred deiz kentañ ar bloaz, ha me bihan c'hoazh. An alumenn gant avaloù am eus bet ur wech en ur bourkig d'am c'hoazh, sukr-et mat. Anavezet mat eo ar fars gant avaloù kenkoulz hag ar galetez pe bignez gant avaloù. Evel dibenn pred eo anavezet mat an tartezennoù avaloù, anvet 'pommée' e kostez Sant-Brieg.

Konfitur avaloù a vez graet ivez met brudetoc'h eo marvat ar sun koazhet graet gante.

Avaloù poazhet er forn gant chufere (chouchenn) ha dour a zo tu da ober ivez, bremañ pa seblant ar chufere bezañ brudet en-dro.

Eus an avaloù eeteuer buan da soñjal er sistr, ar gwad-avaloù evel ma verke war e voutailhoù ur marc'hadour anavezet mat e Landreger. Un tasad jistr mat gant yod kerc'h pe ar c'hampouezh, n'eus netra welloc'h. Ha pa zeu ar goañv kalet, un tasad jistr tomm da lakaat an den en e blomm.

Klevet em eus bet komz eus soubenn avaloù ha gwelet ur vaouez gozh oc'h aozañ evit he merenn avaloù poazh a-gevité gant avaloù-douar (patatez).

Avaloù eta war hon taolioù. Hag a-raok mont da gousket debrñ un aval evit naetaat ho tent.

Yec'hed d'an holl dowar avaloù hon bro.

S. a n T.

UR SELL WAR AR YEZH

Kustum e vezer da implijout an araogenn "a" kemmesket gant ar raganvioù-gour (ac'hanon, ac'hanout, anezhañ) da verkañ renadenn eeun ar verb, e-lec'h ober gant ar raganvioù digemmesk reizh : ma (va), da, e, hon, ho, o.

Abeg a zo bet kavet en implij-se, dre ma laka ar raganvioù-gour renet-eeun en argoll. Ouzhpenn-se, "ac'hanon, ac'hanout, h.a." diouzh o zu a goll o gwir ster. E-lec'h "anezhañ" e lakaer "dioutañ". Da skouer, evit lavarout : "treut-treut eo", e skriver "n'eus netra dioutañ", ar pezh a dalvez e gwirionez kement ha "n'eus netra o tereout outañ". Dioutañ enta ez eo distreset e ster aze. Setu ma'z eo distroadet d'e dro gant "eus outañ", "deus outañ" ha me 'oar. C'hoarvezout a ra un dilec'hidigezh-ster noazus. Evit doare, reizh eo aliañ ar skrivagnerien hag ar re a zo o teskiñ hon yezh da zerc'hel d'ar stumm berr ha da lavarout : "ho kwelet am eus" kentoc'h eget : "gwelet am eus ac'hanoc'h".

Doast ha disklêriañ a c'heller avat e ranker rasklañ diwar ar skridoù implij an dro-doareañ "ac'hanon" implijet evel tra-ren ? Pell ac'hane. E degouezhioù 'zo end-eeun e hañval bezañ reizh.

A-wechoù e kred deoc'h en em gavout dirak ur renadenn eeun pa vez e gwirionez unan dizeeun a vez dirazoc'h. Kement-se eo a c'hoarvez el lavarennoù-nac'hoñ.

Mar leverer : "na gemer ket anezhañ", ac'hanta, amañ, anezhañ n'eo ket renadenn eeun ar verb kemer met renadenn-doareañ ket.

Ar ger ket-mañ ne oa talvoudegezh-nac'hoñ ebet dezhañ gwechall. E brezhoneg-krenn, evel a ouzer, en devoa c'hoazh ur ster-diogelñ. Ne vern pe andon bennak a gavfer dezhañ, e c'heller bezañ sur en deus bet, ur c'houlz a voe, talvoudegezh un anv-kadarn. Ac'hane eo e voe graet gantañ evel pa dalvezje kement ha tamm, tra, dres e-giz maz implijer a-wechoù banne (bannac'h), takenn, seurt, h.a.

Da skouer : ne welan takenn (banne) - ne glevan seurt.

Gallout a reer keñveriañ : "ne welan tamm anezhañ" ouzh "ne welan ket anezhañ". Al lavarenn "n'evas ket anezhañ" a hañval enta bezañ kenkoulz ha "n'evas takenn anezhañ".

Pan eo bet ankouaet talvoudegezh-kadarnaat KET e selljod outañ evel ouzh un darn eus an nac'hadenn (ne ... ket) hag e renadenn-doareañ a gemerjod evit renadenn eeun ar verb.

Er mare-mañ e c'hoarvez un dra damheñvel e kembraeg, a gav din : DDIM OHONOF (strishaet e MOHONOF) a zeu da vezañ renadenn ar verb. Sk. : Ni welais ef a ya da Ni welais mahono (ne welis ket anezhañ).

Diwar-benn un toullad gerioù

EAL = "ebeul", eme ar geriadurioù, hep hiroc'h displegadur. E gwirionez, ar ger divsilabennek-mañ a zo unan ha na verk ket rumm (reizh) al

loerig. Un e a l a c'heli bezañ ebeul pe ebeulez. El liester, n'am eus klevet nemet ar stumm EALIEN.

TUMENN : troet, gant ar geriadurioù, "manteau de cheminée". Piv a lavaro e pelec'h ez eo anavezet ar ger-se. Du-mañ e reer, ken eun ha tra, mantell ar chiminal es an dra-se.

HULAC'H : ur boultrenn tev a-walc'h an elfennoù anezhi. Setu amañ ur ger anavezet mat e Treger. Betek-hen ez eo bet skrivet uloc'h (stumm Kernev, gouez da F. Vallée, Geriadur Bras e "poussière".)

Kaulskoude an H penn-ger, en tu-hont ma vez distaget fraezh gant Tregeriz, a zo harpet gant stumm Pont-'n-Abad (F. Vallée, ibidem) : "fulec'h".

GNEVIñ : v. gnaouet (krBr. gneuff ð. Donet war wel, anat (Dafar 64, p. 71). Me a gav din ne glot ket ar stumm kinniget gant Dafar 64 ouzh ar yezh a-vremañ : greouiñ (pe : grewiñ) a vefe muioch diouzh distagadur hon amzer.

Da harpañ ar mena-se, setu amañ div skouer :

1^o) - E "Burzhud Bras Jezuz", embannet gant Kervarker e 1866, e kaver ar werzenn-mañ :

(p. 119) "Ha huy undro a gvelo gnov" (4) (hervez mouladur 1530).

Hag e traoñ an enebenn, en notenn 4 :

Var... (4) "graou" (hervez mouladur Georges Allienne, Montroulez, 1622).

Gant-se, er bloaz 1622, e veze distaget GRAOU a-neuze.

2^o) - Kaeroc'h 'zo avat. Ne hañval ket ar ger kozh-se bezañ peurlvarv paneogwir e leverer c'hoazh e Perroz (hag e lec'h all marteze), o komz diwar-benn ur vuoc'h o vonet da halañ, pe stumm da gaout he leue pe, evit bezañ resisoc'h, pa zeu da vezañ anat emañ war halañ : grewiñ a ra.

DA LAVAREZ DA : Homañ a zo un dro-lavar a Walarn Bro-Dreger, hag a dalvez kement ha gouez da : Distaget e vez peurliesañ : da lârez da. Hervez an ao. Jules Gros (Le Trésor du Breton parlé, p. 166) e vefe stummet an dro-lavar-se gant "da" (araogenn) ha trede gour amzer-dremenet eun ar verb lavarout (1). Daoust ha ne vefe ket aozet, kentoc'h, gant "da" hag an anv-verb "lavarez", ur stumm a gaver e brezhoneg-krenn ?

Keñveriañ a c'heller an dro-lavar damheñvel implijet e galleg bro-Gebek : "Pour son dire" pe "A son dire" (Da lavarez dezhañ), pe zoken tro-lavar Bro(C'hall : "au dire de".

Evit va c'heloù-me, n'em eus bet klevet du-mañ nemet da lârez din (dit, dezhañ, h.a.) ha gwech ebet da lârsout, da lârsañ, da lârsañ, h.a., e-giz maz eo displeget en Trésor du Breton parlé.

Jakez Konan

BRO-GEMBRE : TUD HA LEVRIOU

Un toullad Kembreiz vrudet a zo marvet nevez 'zo e Kembre. Menegomp da gentañ Syr Ifan ab Owen, diazeour URDD GOBAITH CYMRU. Un den eun ha dilorc'h hag en devoa ar soñj dispar-se d'ober un dra bennak evit ar yaouankiz. Meur a vretan a zo bet e Kampoù ar Yaouankiz e Kembre, evel da skouer er Bala, Glanllyn, ha klasket e oa bet e-kerz ar brezel diwezhañ diazezañ un dra bennak heñvel e-skeud OLOLE ar Breudeur Kaousin, dindan an anv a URZH GOANAG BREIZH.

D. J. WILLIAMS (1885-1970) Marvet d'ar 4 a viz genver tremenet, er un taol, goude ur gaozeadennig e chapel Rhydymerau, war-lerc'h un abadenn-sonerezh. Ne oa ket ezhamm da welout div wech D.J. Williams evit en em dommañ outañ. Un den seder outañ, un aeredigezh vat dezhañ, karet gant an holl, kozh ha yaouank, ha zoken gant kalz a dud ha n'o devoa ket an hevelep menazioù politikel hag eñ. Adalek ar penn-kentañ e oa bet eus ar Gostezenn Vraodel (Plaid Cymru), ket adalek an eur gentañ, rak diwezhat e oa an tren a-benn emvod-diazezañ ar Gostezenn Vraodel ; ha pa en em gavas er gar, e lavaras Saunders Lewis : "Krog omp."

E 1936 e voe dibabet a-unan gant Saunders Lewis hag ar Reverent Lewis Valentine da vont en noz, d'al lun 7 a viz gwengola, da c'hwezhañ an tan e kabanelloù ar Skol-Vombezañ Penberth, e Llyn ; goude-se ez ejont o-zri da gentañ a zool d'ar polis, met pa voe digoret ar prosez e Kêrnarvon ne fellas ket d'ar varnerien o c'hondaonin, ha dav e voe da C'houarnamant Londrez degas ar re gablus da Londrez d'o barn : 9 miz prizon a dapjont. Hag ur gouel eus ar c'haerañ a voe graet en o enor pa zeujont en-dro. Boas e oa da lenn ar Bibl bemdeiz etre 10 eur hanter hag unnek eur, hag e plije da vat dezhañ prederiañ war Aviel Sant Yann, pennadoù XIV-XVII.

Klañc e oa D.J. Williams gant kleñved ar galon, pell a oa, met daoust da se e voe unan eus ar re a labouras ar muiañ, e 1966, pa'z eas Gwynfor Evans war renk Kannoded Kambri ar Gumun ; a vezañ ma oa oon na vije ket aet Gwynfor e-barzh ha n'en devije an dra-se graet efed fall war galon D.J. Williams a oa bet lavaret dezhañ mont d'ar gêr hag ez aje unan bennak da gas keloù dezhañ. A-boan ma klevas en noz gwetur e vignon ar Pastor G. Lewis, ma tispakas ar paotr kozh e benn en e brenestr, hag eñ war lost e roched-noz a youc'has : "Aet eo e-barzh eta ?"

Hag o-zri D.J. Williams, Stanley hag ur mignon all deuet gant Stanley en em lakaas da huchal gant al levnezh e-kreiz an noz, kement ha ken bihan ma lakaas un amezeg dezho, ur saoz, e benn er prenestr : "Petra ar foeltr eo ar cholari daonet-se ?"

- Selaou, va faotr, eme Stanley dezhañ en ur ankouazh e renk enorus a Bastor, ganimp ez eus hennoz un digarez mat d'ober ar cholari daonet-se.

O vezañ ma ouie e oa barnet da vervel kent pell, e fellas da z-D.J. Williams implijañ evit e Vro kement pennadig-amzer en devoa ; marvet eo

bet e-kreiz al labour, hag abidoù o tereout ouzh ur Priñs pe ur Roue a zo bet graet dezhañ.

Ne c'hellomp ket omañ komz eus oberennoù lennegel D.J. Williams : e eñvorennoù, dreist-holl *Hen Wyn e Bau* (Dremmoù kozh) eo o deus graet e vrud a skrivagner.

TREFOR MORGAN, saver ar skol Vadern " Skol Glendour " da zeskñ pep tra dre ar c'hembraeg. Marvet siwazh, arak bezañ gallet kas e hunvre da wir, o varvas en hevelep deiz ha D.J. Williams. Hag e riskl bras emañ *Ysgol Glyn dwr* da gouezhañ.

Syr CYNAN EVANS - JONES. Unan eus pennoù Gorsez Preden-Veur hag an Eistezvod. Bet e oa meur e wech e Breizh, evit lidoù Gorsez Breizh-Vihan. Ur prezeger helvar e oa hag ur c'haezeadennour akuit ; ur barzh klasel e oa kentoc'h ampart-meurbet war reolennoù ar werzaouriezh kembraek, evel just. E 1947 e oa deuet da Vreizh a-unan gant dileuridiñ an Eistezvod d'ober un enklask war emzalc'h ar Gouarnamant e-keñver Breizh hag ar Sevenadur Breizhek (gwelout *Barr - Heol*, niverenn 18, meur 1959, paj. 5-14.)

Warlene, 1969, e oa bet chao ha trouz abalamour d'ar Priñs Charlez pa oa da vezañ kurunet e Kastell Kêrnarvon evel Priñs Kembre. Cynan ne oa ket broadelour ; hag e voe unan eus ar re gentañ oc'h asantiñ kemerout perzh a-unan gant izili ar C'horsez e Lidoù ar Gurunidigezh. Evel gopr e voe roet dezhañ an anv a *Syr*. Difenner taer ar c'hembraeg e oa ivez, ha biskoazh n'en deus pleget d'ar re a felle degos soozneg en Eistezvod ; dalc'het groñs en deus bet atav da reolenn an Eistezvod kembraek. Ne ouie ket nemeur a vrezhoneg, na kalz a c'hallek kennebeut 'm eus aon, met korout a rae Breizh ha meur a vignan en devoa, e Breizh, ispisial e-touez tud ar C'horsez.

J.E. JONES (1905-1970) Nebeut amzer goude m'en devoa embannet e levr *Tros Gymru* o kentañ Istor Gostezenn Vroadel Gembre (gwelout izelloc'h) eo bet marvet J.E. Jones, unan eus pilieroù PLAID CYMRU, bet sekretour meur ar gostezenn Vroadel e-pad 32 vloaz : 1930 - 1962, ken na rankas leuskel dre urzh ar medisin pep labour a gostez abalamour d'e galon. Un den evel-se a oa diaes bras dezhañ chom hep labourat, hag evel just edo e-touez ar re a labour e-lazh-korf da brientiñ dilennadegoù miz mezheven diwezhañ. Un eizh deiz bennak a-raok deiz ar vot, en ur vont d'ar gêr d'e lein, war-dro kreisteiz, e varvas hep e anaoudegezh ouzh rod-stur e garr-tan : c'hwitet e galon.

Gant e labour a sekretour-meur ar Gostezenn Vroadel n'en devoa ket nemeur a amzer da skrivañ, evel just. Ul levr-beaj a skrivas koulskoude diwar-benn Bro-Suis, e 1969 ec'h embannas ul levr diwar-benn al liarz-erezh, hag er bloaz-mañ e levr diwar-benn Istor an Emsav Broadel. Un den e urzh e oa, ha dezhañ ez eo dleet evit ul lodenn vat berzh-mat PLAID CYMRU, rak gouzout a rae urzhioù ha renkañ an traoù, broudañ an dud d'al labour ; dindan e atiz a c'heller lavarout ez eo bet savet ar

skourroù niverus o deus er votadeg diwezhañ diskouezet o efedusted. Un den poellek, plaen e gomz, fur e alioù : urzh, psianted, hegarated, fizioñs divrall en amzer-da-zont Kembre, setu darn eus perzhioù kaer an den-se a galon a garas hag a servijas e vro betek e huanad diwezhañ. Ur gwall-goll evit Kembre, met e skouer a chom, e labour a chom ; gant tud evel-se ec'h odkav ur Vro he renk hag hec'h enor.

J. E. JONES, *Tros Gymru*, Gwasg John Penry, Abertawe, Pris : 30

Goulnnet e oa bet gant J.E. Jones sevel ul levr da gontañ istor PLAID CYMRU - Gostezenn Vroadel Gembre - met e-lec'h kaout ul levr-istor hepken e lavaras an embannour dezhañ kentañ e vuhez war un dra. Gwir eo, ken mesket eo bet buhez buhez J.E. Jones gant hini ar Gostezenn Vroadel ma vije bet diaes dezhañ ober a-hend-all.

Lavaromp hepken e talvez ar boan lenn al levr-se evit an daou abeg-mañ : plijus eo da lenn, da vat, hag e tiskouez penaos e vez adgroet ur penn d'ur vro bet dindan gozleg gant ur vro estren, e-pad pevar c'hant vloaz bennak pe ouzhpenn.

Dichañs a ra da J.E. Jones menegiñ meur a wech Breizh, nemet ne ra ket an danevell dre ar munud eus an darempredoù a zo bet etre tud evel Ambrose Bebb, Meirion Dynallt Owen ha pootred BREIZ ATAO. Sur-mat e vije bet bourrus dimp-ni, Bretoned, klevout hiroc'h.

En daou bennad kentañ eus e levr e kont J.E. Jones istor e vugaleaj hag e yaouankiz ; ha neuze adalek an trede pennad e krog gant istor ar Blaid savet gant Lewis Valentine, Saunders Lewis, D.J. Williams, J.E. Daniel, Ambrose Bebb, d'ar merc'her 5 a viz eost 1925, e Pwllheli (Pwllheli). Evit skignoñ ar menozioù broadel ha stummañ tud e oa ezhomm daou dra : ober bruderezh ha kelenn izili ar Gostezenn Vroadel. Da vrudañ ar menozioù, da skloeraat menozioù-diazez an Emsav broadel, da ziazezañ kelennñ adurezh ofisiel ar Gostezenn Vroadel, e oa ezhomm ur gelaouenn. Setu, e 1926, miz mezheven y *Ddraig Goch* (An aerouant Ruz). *The Welsh Nation*, c'hoar sooznek y *Ddraig goch*, evit ar re digembraeg a oa da vezañ embannet evit ar wech kentañ, c'hwec'h vloaz bennak goude e derou ar bloaz 1932. Gant skrivagnerien speredek-bras evel Saunders Lewis hag e genlabourerien, e oa tonket da gelennadurezh ar Gostezenn Vroadel bezañ meret gant poell ha furnez.

Ne oa ket a-walc'h kaout ur gelaouenn, ret e oa badañ da vihonoñ ur wech ar bloaz, izili ar Gostezenn e SKOLIQU-HARV. E Landelo (Llandeilo) eo e voe dalc'het ar *Skol - Harv* kentañ. Stummet e voe ivez prezegennerien, moulet traktoù e kembraeg hag e soozneg d'ober bruderezh, ha tamm-ha-tamm e voe krouet ur rouedad skourroù (*Canngh-e nnu*) da urzhioù ar stourm ha d'e lakaat efedusoc'h.

Ret eo merkañ ez eo bet urzhiet ken brav an traoù adalek ar penn-kentañ

ma n'eus bet biskoazh disrann ebet, disparti ebet, e diabarzh ar Gostezenn Vroadel abaoe m'eo bet savet. Tamm-ha-tamm, hep klask feukañ den ebet, ez int deuet a-benn da sklaeraat o menozioù ha da ozañ ur ragram ur raktres frammet-mat evit Kembre, ha da stummañ tud akuit.

Met d'ober ar skoulm e oa ezhomm ur sekretour, hag ur c'hras kaer e voe da renerien ar Gostezenn kouezhañ war J.E. Jones. Hemañ a zilezas e gorg a gelenner hag a gitaas Landrez e-lec'h m'edo, evit donet en-dro da Vro Gembre. Den a-boell, labourer, den a-urzh, den a-intrudu e voe ma oa, ez eo bet unan eus krouerien ar BLAID. Ha gant gwir abeg e veze Saunders Lewis labour ar sekretour-meur. Ur pootr hegarat-tre e oa J.E. Jones, fin avat, ludu a-walc'h dezhañ da guzhat e dan, pa veze ezhomm ha don-meurbet en e greiz e garantez evit e vro, hag e gredennoù broadel. Ur sportour e oa ivez hag a blije dezhañ krapot er menezioù. Ha mat e oa dezhañ. Rak ret eo lenn (paj. 137-140) Istor Taur-an-Erer (Antur Tŷ yr Eryr). Tour-an-Erer a vez graet eus unan eus tourioù-meur Kastell Kêrnarvon, ha war an tour-se e veze ar Banniel Saoz (Union Jack). En em eus ket ezhomm da lavarout deoc'h e oa ar banniel-se e goulou an tîger adeloerien. Setu ma tivizas J.E. Jones pignat, deiz Gouel Sant Dewi (Dewi Sant), deiz Gouel Sant Broadel Kembre, d'an 1 a viz m'edo. Gwisket gantañ dilhad da vont war varc'h-houarn, pezhioù lunedoù, e voe fri, hag ur sac'h-beaj war e chouk, e tremenas dre zor ar C'hastell, hep bezañ anavezet : er sac'h edo ar Banniel Kembre. Tri c'hamalad dezhañ - unan anezho niz da Lloyd George - en em gavas eno diseblant ivez. Hag a-fevar da lein an tour, diskenn an UNION JACK ha sevel er vann ar peh banniel a oa deuet gant J.E. en e sac'h, ha kregiñ da gonañ a nerzh o fenn H e n W l a d f y N h a d a u ; ha mignoned dezho en traoñ war ar blasenn o youc'hal dezho hag o strakal o daouarn.

Hag i a-fevar o tiskenn er vias da harpañ an nor evit herzel ouzh gwarded ar C'hastell da dremen. Un hanter- eur goude, e teuas polised da sikour digeriñ, da bakañ ar baotred, da gemer o anvioù, ha da "adperc'hennañ" ar Jack ; ha lakaat neuze ar baotred er-maez eus ar C'hastell. Un eur goude, met gant kalz a boon, e oa adpintet ar JACK e beg ar wern, war lein an tour. Met...

Ne oa ket echu. Rak goude kreisteiz, studierien eus Skolaj Bangor ha no ouient netra eus ar pezh a oa tremenet, a zevas da Gêrnarvon, gant ar soñj d'ober un taol-trafalgar bennak ivez. Prennet ha prennet-mat avat e oa dor an tour. Met ar re-mañ, soupl evel gwiñvered, en em silas dre un darzhell bennak e diabarzh an tour. E berr-amzer evoent war lein an tour o tiskrougañ an UNION JACK d'o zro, Kerkent avat e teredas ar bolised; gant kalz a boon avat e teujant a-benn da zastum an holl baotred ha d'o bountañ er-maez eus ar C'hastell. Met unan eus ar re-mañ en devoa paket ar banniel en-dro d'e gorf, d'indan e zilh, hag a yeas da Vurev ar Gostezenn Vroadel d'hen dispakañ.

A-benn neuze e oa en em vodet ur bobl a dud war ar blasenn. J.E. Jones hag ar re all a gomzas dezho diwar-benn divergantiz ar Saozon. Unan

bennak a huchas : Dewi ar banniel. Met kaer a oa bet strakal n'ouzon ket pet alumetezenn, ne grage ket an tan ennañ. Neuze e voe didammet hag e kasas pep hini gantañ un tamm e memor eus an darvoud. Miret eo bet gant evezh an tammoù-se betek en deiz a hiziv, e koun eus "Avantur Tour-an-Erer". Ha diwezhatoc'h e kemeras J.E. Jones evel anv skrivagner "Tour an Erer, evel ma sine e bennadoù war Y F a n e r.

Ur pennadig-amzer goude, e voe daskoret da J.E. Jones ar Banniel Kembre gant unan eus an ofiserion-balis. Se 'oa er bloaz 1932. Er bloaz war-lerc'h avat, deiz Gouel Sant Dewi, e voe savet an AEROUANT RUZ war an tour all. J.E. Jones a vije bet stad ennañ o wintañ ar banniel e-unan da veg ar wern. Met bez' e oa unan all hag a reas an taol-se, sioul ha didrouz hag evel mezhek, dirak bugale hag un toullad tud dibabet : Lloyd George a-unan.

Ken plijus all ez eo Istor ar Skol-Vombezañ da lenn. Istor an Emgann evit ar Radio Kembraek ivez, un emgann didruet, gant Saunders Lewis ur wech o trevezañ ger evit ger koulz lavarout prezegenn faeüs Pennrener ar B.B.C. ma tarte Lloyd George hag a oa eno, gant ar fent;

Met gwelloc'h marteze dibab un dra all.

Un dismantr ez eo bet ar brezel diwezhañ evit an Emsav, e Breizh. Goude 1945, e oa pep tra da adsevel, en desped da rakvarnioù niverus ar bobl, bountet enao, gant bruderezh ar Gouarnamant hag ar c'hozetennoù, ha kresket gant o c'hasoni ouzh an Alamaned ; hep kontañ an disrannoù etre ar Vretoned a-hend-all, ha Paotred ar Stourmerezhañ Kuzh o klask duiñ ar Vrogarourien. Meur a hini eus ar re-mañ a oa bet fuzuilhet, re all a oa er prison, hag ar re all o devoa ranket mont d'an harlu, ha pa zeujent en-dro e vijent koshaet ha fallgalonet. Pep tra da adkomañs a-blaen-font koulz lavarout. Kement-se n'eo ket en em gavet gant Bro-Gembre. Da gentañ n'eo ket bet aloubet na Bro-Saoz, na Bro-Gembre gant an Alamaned, ha diaes eo gouzout petra a vije en em gavet, mar bije bet an traoù evel e Breizh.

Daoust m'o devoa enebourion, ez eo deuet a-benn ar Gostezenn Vroadel e Kembre da dreuziñ ar brezel, hep ma vije bet dibennet, er c'hontrol... kreñvaet ha nerzhet ne lavaran ket.

Lakit ar Saozon ken fall ha ken kriz ha mar kirit, ur spered ispisial o deus : respetiñ kredennoù an dud. O, gant prop evel just, rak ur muzul a zo da bep tra. Ha pell emañ ar Saozon da vezañ Sent gwitibunan. Met poan a vije bet oc'h ober emañ, ar pezh o deus graet Kembreiz e-pad ar brezel : bountet en toull-bac'h, kaset da linenn an tan ha, diouzh ret, fuzuilhet, sed a vije lod ar Vretoned mar o dije klasket ober ar pezh a reas Kembreiz en o bro, d'indan fri ar Saozon.

Bez' e oa tud niverus e Kembre hag o oa a-du gant ar Peoc'h hag a-enep kement seurt brezel a zo. Pasifisted anezho (Pasiffistiaid, emeza) ha PLAID CYMRU en em zisklêrie a-du gant ar Peoc'h hag a-enep ar brezel, o nac'h dougen darn da Vro-Saoz da vrezeliñ hag o nac'h ivez kemer an armoù a-enep Bro-Saoz. O santout ar brezel o tastaat, pennoù PLAID

CYMRU a felle dezho prientiñ an dud da vezañ Emvourien-dre-goustiañs ha pa voe votet al lezenn war ar servij-soudard evit an holl, e nac'has Plaid Cymru mont a-du. O vezañ ma oa kalz a dud pasifisted e oa sur bruderezh ar Blaid da vezañ degemeret mat, n'eus forzh penaos. Aozet he devoa ar Blaid paperoù, dreist-holl gant e sekretour J.E. Jones, da zisplegañ d'an emvourien-dre-goustiañs penaos en em gemer ha penaos en em zifenn pa vijent galvet dirak al lezvarnioù. Met dav e oa diskouez dezho e oa dre goustiañs e nac'hed dougen ar armoù. Hag ijin J.E. Jones a voe lakaet Karantez Kembre evel un abeg a goustiañs o reiñ ar gwir da chom hep brezelin a-du pe aenep Bro-Saoz, da lavarout eo, rediañ ar Saozon da anavezout Kembre evel ur vro disheñve diouzh Bro-Saoz.

E Bro-C'hall ec'h ouzer a-walc'h ne oa ket anavezet ar gwir-se d'an emvourien-dre-goustiañs, ha pennoù an Iliz n'o deus biskoaazh kredet ober disklêriadurioù war ar poent-se.

Prosezoù a voe graet evel just da glask rediañ Kembreiz yaouank da sevel d'al lezenn, met peurvuiañ, a-drugarez d'ar gelennadurezh o devoa bet, e teujont a-benn d'en em ziluziañ. Setu amañ un tamm fentigell fennet eus levr J.E. Jones. Ur paotr yaouank emvour-dre-goustiañs, ha broadelour, Olivêr Hughes eus Langwm (Llangwm) a voe galvet dirak ar barnour Syr Artemus Jones. Setu amañ lod eus an diviz a voe etrezo : Syr Artemus : Petra 'lennit eta bezañ a-enep mont d'ar brezel ? O. H. : N'em eus ket a c'hoant, tamm ebet, da lavarout.

Syr Artemus : Tamm c'hoant ebet ? Ret eo deoc'h lavarout. Adgoulenn a ran ouzhoc'h : petra a lennit ?

O. H. : Ma. Skridoù an Itron Artemus Jones.

Homañ, gwreg ar barnour, a oa pasifisted, hag he devoa skrivet meur a wech a-du gant ar peoc'h.

J.E. Jones e-unan a voe galvet pemp pe c'hwec'h gwech dirak al lezvarn (lezvarn-an-arme, pe lezvarnioù all). C'hoant a oa d'hen diskar evit dibennañ ha diskar war un dro ar Gostezenn Vroadel. Met c'hwitout a reas e enebourien war o zaol, rak gout a ouie hor paotr en em zifenn. Ha div wech bennak zoken e teuas ofiserien uhel d'e welout ha da reiñ da c'houzout dezhañ petra a oa o c'horin a-enep dezhañ. Ha n'eus forzh penaos, a-raok mont evel-se dirak al Lezvarn, en devoa urzhiet mat an traou en doare ma talc'hje ar Blaid da vont war-raok ; hag eñ, hervez kuzul Saunders Lewis, a briente e dammig malizennad-traou da vont da ziskuizhañ da brizonioù ar Roue : e aotenn gant laonennoù da cheñch, e Vibl hag e Levr-Imnoù. Met ne gredjont ket her bountañ en toull. Ha tud eus Gostezenn al Labour ne vankent ket d'e harpañ kennebeut.

Setu perak, zoken e-kerz ar brezel, ez eas ar Blaid war greskiñ : eus 3 750 a izili e 1939, e savas da 6 050 a-benn 1945. Hag e talc'has an niver-se da vont war greskiñ goude :

e 1950 : 9 000 - 1955 : 15 000 - 1962 : 24 000 - 1966 : 28 000 -

1969 : 40 000 (2).

E 1966 e oa bet tremenet Gwynfor Evans, pennrener ar Gostezenn Vroadel, da zepute evit kelc'hiad-vôt Kerverzhin, en un advotadeg ; er bloaz-mañ avat, n'eo ket aet e-barzh ; ar pezh a zo bet ur galonad evit e vignoned, met tamm ebet ur c'holl evit Kembre, rak bremañ e c'hella implijout e holl amzer da beurstataat Plaid Cymru. War-dro 175 000 mouezh o deus bet ar Vroadelourion dre Gembre a-bezh, ha lakaet o devoa war ar renk un den e pep arondissamant : 36 den (ur Saoz zoken en o zouez) ha meur a hini anezho a zeue da eil er mouezhiadegoù.

Frouezhus-meurbet eo bet labour stourmerien dispar evel J.E. Jones. Setu perak ne gav ket dimp ez eo just ar pezh a skriv "Sav Breizh" war niverenn miz gouere 1970 diwar-benn ar mouezhiadegoù, e Kembre, en 18 a viz mezheven, o lavarout n'o deus ket kemeret ar Vroadelourien an hent mat, pa n'eus, emezo, hent all ebet nemet : Hent ar Reveulzi da dizhout ar frankiz. Sur-mat emañ ar wirionez gant paotred "Sav Breizh" pa lavaront ez eo Hent ar Reveulzi Hent ar Frankiz evit Breizh evel evit pep bro trevadennet, nemet emañ Kembreiz oc'h ober o Reveulzi en o stumm ha da gentañ-penn stummañ tud d'o lakaat barek da gemerout stur o bro, pa vo deuet ar c'houz.

Mat e vo levr J.E. Jones da sklêrijennañ tud an Emsav Breizhat, da ziskouez perak n'int ket deuet a-benn da grouiñ netra start, na da virout an unaniezh etrezo. Ha mat ivez da ziskar treuzvenozioù diwar-benn efeedusted politikerezh PLAID CYMRU.

Ar re a lenno levr kaer ha resis J.E. Jones Tr o s Gymru, a ranko estlammañ ouzh nerzh-kalon saverien ar Gostezenn Vroadel, ouzh sklênder o gweledigezh, ouzh al labour sevenet gant urzh hag unaniezh abaoe 45 bloaz, hag a zeuio da grediñ ken start hag izili PLAID CYMRU o-unan emañ an trec'h dezho.

K L E R G

K E L A O U E N N O U

ARZEL EVEN : Istor ar Yezhoù keltiek, levrenn 11 embannet gant **Hor Yezh** (goulenn al levr digant P. Denez, Ar Riz, Ploare, 29 S - Douarnenez)

Gortoz pell, gortoz well, eme ar c'hrennlavar tregeriek. Saludamp eta e-giz ma tere an eil lodenn da lavarout an dibenn eus labour vras Arzel Even war ar Yezhoù keltiek.

En eil lodenn-mañ e kaver Istor ar C'hembraeg, an Iwerzhoneg (Iwerzhoneg, hervez an oberour), ar Manaveg, hag ar Skoseg, da lavarout eo Gouezeleg Bro-Skos. Nebeut-kaer a dud, e Breizh da vihanañ, a c'hello kaout da abegiñ e gouiziegezh Arzel Even, anezhañ unan eus brasañ gouizieion a zo war ar Yezhoù Keltiek. Ar pezh a zo da veuliñ zo en deus aezet e labour e brezhoneg, ha peurvuiañ e brezhoneg sklaer ha mat. Ur fazi bennak a gaver amañ hag ahont en destenn, dre zievezhad :

paj. 475, 7^{vet} linenn diwezhañ **HARZHET** e-lec'h **HARZÉT**, an hevelep tazi a gaver paj. 510, 3^e linenn diwezhañ : **HERZHEL** evit **HERZEL** ; gant ar skritur unvan n'eus tu ebet da faziñ koulskoude etre **HERZEL** hag **HARZHAL**.

paj. 505, ne ouzon ket ha reizh ez eo skrivañ : James VII-11 a ... glaskas **DASKORIN** ar Gatolikiezh. Daskoriñ ? Dasorc'hiñ marteze ? Ha neuze daoust ma leverer kentoc'h **KATOLIKED** ez eo gwelloc'h, a gredan, **KATOLIGIEZH**.

paj. 503 : E gwirionez **N'EO** nemet **Gevred ar Vro**. Ret skrivañ : **N'EUS**. paj. 513 : en arvar **DIGANT** an douristiezh - ha digant traou gwashoc'h . N'eo ket **DIGANT**, met **GANT** eo a zleer skrivañ, pe skrivañ neuze : **EN ABEG**, **ABALAMOUR**, **EN ASKONT**, h.a.

E-keñver geriadur, merkomp ez eo iskis lenn paj. 507, linenn 13 : ha kannet e veze ar vugale gant ar vistri-skol ha gant o c'herent ivez ma komzent skoseg. Gant **O ZUD**, maarvat, da lavarout eo a zad hag o mamm. Ur ger aezet ez eo ar ger **KERENT** e degouezhoù 'zo, met **tud** ar gerentiezh setu ar gwir ster anezhañ.

Amañ hag ahont ez eus bet ankouaet merkañ pajenn ar c'henarroudoù, da skouer, paj. 460, notenn (s. p.) s. p. = sellit paj. met ar sifr ? Ar pezh a vank ivez e dibenn al levr ez eo ur roll eus ar pennañ gerioù studiet e korf al levr. Klask un dra bennak a vo klask ur spilhenn en ur voutellad-foenn, 'm eus aon.

Hogen dirak labour veur Arzel Even en deus ar gwir pep hini da estlaminñ da drugarekaat an oberour hag an embannerion.

K l e r g

MOUEZH SANT ERWAN, embannet gant **Skol**, K.R.P; **SKOL**, Krec'h Avel, Lannuan, Roazhon 1 911 06, Koumanant da 4 niverenn Mouezh Sant Erwan : 15 lur.

Koumanant da 4 niverenn **Skol**, gant **Mouezh Sant Erwan** : 15 lur. **Mouezh Sant Erwan**, d'hor mena, a zlefe bezañ ur c'hannadig o reiñ keleier diwar-benn Breuriezh Sant Erwan, ha zoken ur follenn-geleier hep muiken etre izili ar Vreuriezh, kentoc'h eget ur gelaouenn evel ma seblant kaout c'hoant da vezañ, rak er stad m'emañ e vefe aes tre he stagañ ouzh kelaouennoù all heñvel : **Barr-Heol** pe **Studi** hag **Ober**. Ar gaaeadenn gant **Yann Talbot** : ar Gwenvidigezhioù he defe gonezet kalz mar bije bet skrivet en ur yezh souploc'h un tamm, kuit da gouchañ enni kement-se a c'herioù difetis. Met "gant kolo hag amzer e veñra ar mesper." War-bouez labourat e teuer a-benn da vestroniañ ur yezh : keñveriañ da skouer, yezh P. Bourdellez gant hini **Yann Talbot**. Plijus eo a-hend-all prezegenn an Aotrou **Kalvez** evit eured **Fañch** ar Moal hag **Anne Bourdonneg**; hag ivez ar c'heleier eus **Bro-Gembre**. Menegomp ar studiadenñ c'hallek savet gant P. Bourdellez diwar-benn an Iliz e Breizh hag ar **Gudenn** gevredadel.

WANIG HA WENIG. K.R.P. **Journal Wanig ha Wenig**, Rennes (Roazhon) 1 705 96. Koumanant-bloaz 5, distaal pa gemerer meur a skouerenn.

War gaeraat bep taol ez a kelaouennig ar vugale. Setu **Wanig ha Wenig** gant ur golo a-liv. 'M eus aon ne oar ket ar Vretoned ar vad a c'hellfe ar gelaouennig-se ober, hag a zlefe ober. Evit ma tevio da vat labour an Aotrou **Kalvez**, rener ar gelaouenn, e vo dav ober bruderezh en ur stumm all, hag ar gwellañ bruderezh a vo ober tro ar Skolioù, ha zoken tro an tiegezhioù da ziskouez ar gelaouenn, da werzhañ anezhi, da glask komanterien, da urzhiañ ar c'henstrivadegoù, hag ivez da brientiñ war-dro fin ar bloavezh-skol ur gouel evit ar vugale. Er bloaz-mañ, 1970, ez eus bet graet un hanter-devezhig evel-se e dibenn miz mae, evit bugale **Kaouenneg** ha **Bulien** : lenn, komz, kanañ. Paotred ha merc'hed eus skol-ajoù **Lannuan** a oa deuet da sikour. Da bep hini eus ar vugale, e voe roet un dra bennak ; stad er vugale o vant d'ar gêr. Ar **bleun-Brug** a zo bet pampez a-walc'h evit skubañ diwar e hent al "labourerien", hag evel just, ez eo kouezhet en **Eskopti Sant-Brieg**. Se 'oa da erruout. Dav sevel un dra all gant ur spered ledanoc'h, dreist-hall evit bugale ar Skolioù.

OLOLE : l'illustré Culturel des Jeunes et des Familles de Bretagne, bi-mensuel. Koumanant evit 12 niv. 6 miz : Ordinal : 23 lur, harperien : 40 lur, a-enor : 100 lur. K.R.P. H. Caouissin, 12 404 09 Paris.

E-pad ar brezel he devoa ar gelaouenn **OLOLE** graet kalz a vad d'ar vugale hag e meur a skol e oa bet savet **Kelc'hioù Olole**. Ar gelaouenn nevez gant un tamm brezhoneg warni a zo moulet da blijout sur-mat d'ar yaouankizoù. Spi hon eus e raio kement a vad hag he c'hoar bezañ.

PREDER : R. HEMON, Geriadur istorel ar Brezhoneg rakprenañ :

Pep rann a 100 pajenn : 9,00 Lur
Div rann : 15,00 Lur
Pemp rann : 37,50 Lur
K.R.P. Dr Etienne, 16 093 13 Paris

N'ouzomp ket pet rann a vo e labour R. Hemon, met dleout a ra bezañ erru tost d'an hanter gant ar Rann 16 : Kaouenn-Kempenn. Evit ul labour a-bouez evel-se ez eus sur-mat un dra bennak a-dreuz, rak diaes ez eo da lenn : keñverit ar bajenn gentañ, pe ar bajenn diwezhañ, hag ar peurrest eus an niverenn hag e komprenot diouzhtu petra a fell dimp lavarout. Gant al liesskrivadurioù e ranker derc'hel kont eus ar c'houlz-bloaz ma vezont moulet. Pa vez tennet stensiloù e-kerz ar goañv e vez labour fall, kaer a vez tommañ ti ha liv. Sellit dam eus niverennoù Ar Bed Keltiek. Sellit, mar kirit, ouzh bloavezhioù Barr-Heol : div niverenn a zo du, hag an div all pikous a-walc'h : ar re-mañ eo niverennoù ar goañv : Meurzh (tennet e c'hwevrer) ha Kerzu. Daoust ha n'eo ket se a zo kaoz m'eo moulet ken fall peurlvusañ. Ar Geriadur Istorel. Mar ne deo ket se, neuze tamall d'ar stensiloù pe d'ar mekanik da skrivañ, met kerse ha kerse da vat ez eo gwallegañ er stumm-señl labour pouezus-meurbet evel ar Geriadur Istorel.

PAX, kelaouenn Abati Landevenneg
P. OLLIVIER, Landevenneg 29 S - Argol
K.R.P. 500 44 : 6 Lur.

War niverennoù 82-83 (Ebrel ha Gouere) ur studiadenn dalvoudus war Droidigezhioù ar BIBL e brezhoneg.

LO GAI SABER, Revista de l' ESCOLA OCCITANA.
K.R.P. Toulouse 1 172.40

Kelc'hgelaouenn divyezhek renet gant an Abad Salvat.

En niverenn 350, Mai-Junh, lenn ar rentañ-kont eus perc'herinded perc'herinded Okitania da Lourda. Kanet e oa bet an oferenn en okitaneg penn-da-benn.

Ul levr a zo bet moulet en daou liv : ORDENARI DE LA MESA latin-okitaneg, 20 Lur, frejoù-kas ha tout. Goulenn : Privat, 14 rue des Arts, Toulouse K.R.P. 1 172.40. Tennet ez eus bet 50 skouerenn niverennet (30 Lur gant un dedi a-berzh an oberour).

STUDI HAG OBER : AN OFERENN SANTEL
DII; St Gal de Pons, K.R.P. 519 40 Roazhon : 8 Lur.

Al levr-mañ a gaver ennañ an Ordo Missae nevez (Urzh nevez an Oferenn) ha troidigezh ar Pedennoù-Meur I, II, III, IV aozet gant Komision Etreeskoptiel St-Brieg ha Gwened. Ul levr liesskrivet, ment 21 x 27, moulet sklaer. Pa oa ezhomm eus ur seurt labour, eo bet moulet prim-ha-prim, ha setu perak ez eus un nebeudig mankoù ; da skouer, ankounac'haet merkañ jestroù ar beleg : astenn an daouarn, bennigoñ + (ober sin ar Groaz) hag all.

Mat e vefe bet skrivañ div wech ar Bater Noster. Met gwir eo, an neb a implijo al levr ne vo ket pell o kustumiñ. Dre-se ne deo ket kement-se ur gwell-afar. An tonioù kinniget ne dint na gwashoc'h na falloc'h eget ar pezh a zo bet embannet e lec'h all. Ne vern penaos e vo ret gortoz a-raok kaout tonioù diazezet-mat ha galvet da badout. Ober eta bremañ gant ar pezh a zo.

E-keñver troidigezh. Gouzout a reer en deus nac'het Eskopti Kemper ken-labourat gant St-Brieg ha Gwened evit sevel un destenn beurvan evit Breizh a-bezh. Kerse eo, rak al labour sevenet gant Komision St-Brieg ha Gwened a ziskouez ez eus tu gant pasianted ha labour, da erruout er pal-se. Talvoudus e vefe, na petra 'ta, studiañ an disheñvelderioù a zo evelkent en div droidigezh. Keuziañ a c'heller pa n'eo heñvel-mik AR GLORIA hag ar GREGO, met ken ez eo nevez 'zo e oa chomet Gwened disparti diouzh an Eskoptioù all ha graet o zroidigezh evito a-unan. Evel-se : Prefasoù ha Pedennoù-Meur a zo heñvel e St-Brieg ha Gwened, fra ma'z eo heñvel ar GLORIA IN EXCELSIS, ar GREGO, ar SANCTUS, an AGNUS DEI ha pedennoù all en Eskopti St-Brieg ha Kemper.

Mercomp an dra-mañ hag a c'heller bezañ danvez-studi evit ar yezhadurourien : Pedenn-Veur, komzoù ar Sakridigezh :

St-Brieg : Kemerit holl ha debrît, rak kement-mañ EO va c'horf Gwened : Kemerit holl ha debrît, rak kement-mañ A ZO va c'horf

Kilet he deus ar Komision ivez dirak ar ger TERRIÑ ha lakaet bep tro en e lec'h : RANNAÑ. Koulskoude e vez lavaret TERRIÑ an OSTIV ha neket RANNAÑ. Katekiz St-Brieg a lavar : Pa DORR ar beleg an Ostiv-Sakr hag-eñ a DORR ivez Korf Hor Salver ? Ha c'hoazh : Pa vez TORRET an OSTIV, pelec'h en em gav Jezuz-Krist ? R Jezuz-Krist en em gav holl e pep tamm eus an Ostiv DORRET.

Gerioù disheñvel ez eo TERRIÑ ha RANNAÑ, met amañ, evelkent, ez eo sklaer ar ster.

Moarvat ne oa ket aes treiñ HOC FACITE IN MEAM COMMEMORATIONEM. Un tamm e kaver difetis da gentañ : GRIT KEMENT-MAN EVIT LIDAN AR SONJ AC'HANON, met ne vezer ket pell o kustumiñ.

Ur frazenn a zo koulskoude ha na gavamp ket eus ar reishañ : Pedenn-Veur IV, paj 42, goude ar Gorreoù :

Setu perak, Aotrou Doue, NI ivez,
en ur lidañ bremañ Mister hor Salvidigezh,

E TALC'HOMP soñj eus Jezuz, h.a.

Ar beleg ha na vo ket war evezh a lavaro sur-mat :

NI ivez A ZALC'H soñj. Gwelloc'h e vefe cheñch plas d'an NI IVEZ-se pe sevel ar frazenn en ur stumm all.

Un ali da glozañ : evit ar pedennoù ha n'int ket bettroet, evel da skouer, ar salud d'an OSTIV SAKR ha d'ar GWAD PRIZIUS, goude ar Gorreoù, daoust ha ne vefe ket tu d'ober an hevelep troidigezh.

Hor gourc'hemenoù hag hor meuleudi d'ar Gomision evit he labour Gaer ha spletus.

Pedennoù en Overenn : moulet dre Offset evit Bro-Wened. An dud dizevar hag an dud kurius o devo moarvatplijadur o keñvariañ an destenn a ginnig deomp Gwenediz outh an hini a ginnig Sam-Briegiz. Tchet ez eo muziker en Wened, war a seblant, da gemer skouer war an tonioù gall a-wechoù. Da skouer MELASICN DEOC'H, SALVER JEZUZ ; marteze ez eo aezet gant o rannezh. Met evelkent n'ankounac'haont ket o zonioù brudet o-unan a gaver heklever anezho e meur a lec'h. N'ouzomp ket petra da soñjal eus tonioù ar BATER NOSTER, notennet e dibenn al levr. Allevr-mañ a ziskouez ez eus tud e Bro-Wened ha na vennont ket bout lonket hep huchal na stourm. Gourc'hemenoù dezho.

Goulenn al levr digant : an Aotrou Meriadeg Herriue, person, Lokoal-Mendon, 56. Priz : 10 Lur.

Merkomp en ur dremen ez eus tu da ganañ e-kerz lidoù-ar-c'hinnig, ar respont BEZIT BENNIGET, AOTROU DOUE, A-VISKOAZH DA VIRVIKEN a gaver p. 78 eus an OFERENN SANTEL, war an ton kentañ eus levr Gwenediz : BENNOZH DA ZOUE HA MELASION A HOLL VISKOAZH DA VIRVIKEN, p. 64.

57

Armand Le CALVEZ : *Un cas de Bilinguisme : Le PAYS de GALL E S, Histoire, Littérature, rakskrid gant an Aotrou Fleuriot, kelenner e Skol-Veur Roazhon, embannet gant Skol.*

Al levr-mañ eo an danvez a zo bet kinniget gant an Aotrou Kalvez, rener Skol, da vezañ degemeret evel Doktor ar Skol-Veur, e 1969. Al levr a oa da vezañ dreist-holl ur studiadenn war an Divyezhegezh e Kembre a zo bet roet muioc'h a dro dezhañ betek donet da vezañ evel pa lavarfen DORNLEVR WAR GEMBRE : Istor ar Vro, Istor ar Yezh hag al Lennegezh, Istor e-keñver Ekonomiezh hag all, ha neuze Kudenn an Divyezhegezh, kement a zo stag ouzh ar gudenn-se : Skolioù bras ha bihan, Radio, Skinwel, Mouladurioù hag Embannadurioù.

Ul labour objektel, dibersonel zoken p'en deus klasket an oberour lezel an dud all, ar fedoù, an darvoudoù da gomz en e lec'h, gant aon da gammañ, da zistresañ ar wirionez.

Dibersonel, a lavaran ? Ret eo en em glevet war ster ar ger-se, na petra : n'en deus ket klasket an oberour silañ e venozioù personel, tamm ebet, setu holl, rak ranket en deus labourat da vat, ha tremen eurvezhoù hag eurvezhoù evit renkañ, urzhiñ, frammañ, kempenn en un doare levr ha plijus an dielloù fonnus-meurbet en devoa dindan e zorn : 6 pajennad leun a ya gant al Levrlennadurezh e dibenn an oberenn. Dielloù e kembraeg kozh ha nevez, saozneg, brezhoneg, galleg. N'eo ket lavaret en defe an Aotrou Kalvez lennet penn-da-benn ar bern skridoù-se, met ne vern penaos, talvoudus-tree vezo an dielloù-se da heñchañ ar re o devo c'hoant da vont donoc'h e studi ar poent-mañ-poent.

Gallout a reer dichipot meuliñ an oberour evit e labour. Nemet evel just e c'heller abegiñ traou 'zo ha burutellat darn all, Ar pep dispilijusañ evit ar vrezhonegerien a vo an implij eus ar galleg evit sevel al levr, hag eus ar galleg hepken. Komzet e vo eus bruderezh, eus efedusted, eus reolennoù ha lezennoù ar Skol-Veur ha me 'oar. Traou gwir taut an traou-se. Despetus eo e rank ar vrezhonegerien plegañ da zegemer ar seurt traou, ha rankout ober bruderezh dre ar galleg. E Bro-Gembre e rankont ober bruderezh e saozneg ivez, met n'eo ket well se, tamm ebet. Ret eo m'ar hag advêrat an holl gudennoù-se e yezh ar Vro, hag aberzhiñ traou 'zo. Anez ez eomp sur da vezañ peurdebret. Skouer ar gouzieg bras Ifor Williams, meneget el levr paj. 130 a zo mat evidomp ivez.

Petra da soñjal avat eus an Divyezhegezh. N'emañ ket Kembreiz a-unvan war ar poent-se. Daoust hag e c'heller ober gant ur babl ur babl divyezhek -krenn, ken ampart war an eil yezh hag eben ? Tud eus ar speredatañ, evel Saunders Lewis a zo a-enep (paj. 146). En ur vro e-lec'h m'eo diskennet da vat niver ar gembraegerien ha m'en deus ar saozneg aloubet tachenoù ledan, e ranker darc'hel kont eus ar fedoù-se, ha diwall da zistrannañ ar vro. Met gant Bro-Saoz e-kichen, gant an darempredoù stankoc'h-stankañ gant ar broioù saoznek, gant ar skinwel - hag a zo ac'h ober ul labour drastus, ur spont, e Breizh hec'h-unan - ez eo diaes-tre krediñ emañ silvidioezh ar Yezh an Divyezhegezh. Keit ha na vo ket

mestrez Kembre war he skolioù, war ar binvioù modern a zaremprederezh e vo gwir eviti al lezenn digar, lezenn ar bed : Lezenn an Hini kreñvañ. Ur bazenn ez eo an Divyezhegezh, pa ne c'heller ket ober a-hend-all, ur bazenn mat evit ar beorien ; met kosteziañ a ray an traou tu pe du a-barzh ar fin.

Diaes a-walc'h ez eo gouzout soñj resis an oberour war ar poent-se. Douget ez eo kentoc'h da vont a-du gant an Divyezhegezh, war a seblant met gant onestiz en deus displeget menozioù an daou rumm : pootred an Divyezhegezh ha pootred an Unyezhegezh.

Disheñvel emañ ar stal e Breizh, e meur a geñver, diouzh hini Gembre ha koulskoude ez eus e levr kaer an Aotrou Kalvez peadra da verkañ an hent d'ar Vretoned.

K L E R G

Goulenn al levr

"Skol" K.R.P. 1 911, Roazhon - Krec'h Avel, 22 LANNUON.

Priz : 19 Lur.

LIDOU AR GONFIRMASION - Kaouenneg 1970 - Barr-Heol
2 Lur

Dindan anv Barr-Heol eo bet lakaet ar mouladur eus Lidoù ar Gouzoumenn e Kaouenneg, evit abegoù a vererezh hepken hag embannet eo bet gant Imprimatur Sant-Brieg.

Implijet eo bet e Kaouenneg d'ar 26 a viz mae 1970, dres evel m'emañ. War golo al levr emañ luc'hskeudenn an Iliz gant kompiri ar Gouzoumenn hag an Aotrou Klerg en o c'hreiz. Pep tra a zo bet tennet dre Offset. Al Lidoù o-unan, da lavarout eo Pedennoù ar Sakramant, a c'hell bezañ implijet n'eus forzh pelec'h peogwir ez int bet aprouet gant Eskopti Sant-Brieg.

Ne oa tu ebet da lakaat al Lidoù evit unan hepken daoust ma oa bet an oatre ivez, met aes-tre e vo lakaat ar pedennoù-se en un dander diwar al liester, mar bez ezhomm, evit reiñ Sakramant ar Gouzoumenn d'un den hepken.

Merkomp en ur dremen, evit pezh a sell ouzh Istor ar Yezh, penaos ez eo bet roet ar Gouzoumenn, e kanton Lannuon, er bloaz 1970. Kêr-Lannuon; Parrez Sant-Rak = galleg hepmaiken.

Ploubêr-Plourec'h : = galleg penn-da-benn, daoust m'eo brudet Plourec'h abalamour d'he c'hantikoù brezhonek, met Ploubêr a harval bezañ aet tre war ar galleg hag e Ploubêr e oa ar Gouzoumenn.

SERWEL-BERLAWENEZ = galleg penn-da-benn, nemet da glozañ un tamm eus kantik Sant Pêr, patron Serwel.

TREZINI, LANVILIN-ROSPEZ = lod a dri c'hantik e brezhoneg, ar peurrest e galleg.

KAOUENNEG-LANVEZEG-BULIEN = brezhoneg penn-da-benn, nemet ar sarmen gant an Aotrou Vikel-Vras.

En niverenn-mañ eus Barr-Heol e vo kavet, tennet eus levrig ar Gouzoumenn, daou don evit ar BATER NOSTER, unan savet gant an Aotrou Bocher, kelenner e St-Jozef Lannuon, hag egile gant an Aotrou Gall, person Pedernege, gant tonioù all evit dibenn al Lennadennoù : Setu komzoù Doue : Bennozh da Zoue - Setu komzoù Jezuz-Krist : Meuleudi deoc'h, Salver Jezuz.

LEKSIONALOU Barr - Heol
Da bep hini e dra. Gwerz Pask : ar Victimae Paschali Laudes a zo bet lakaet e brezhoneg gant abENNEZ. Ur ger hepken a zo bet kemmet en eil poz :

Marv an Oan 'vit an deñved
Gant e Dad, Krist dibec'hed

En deus adunvanet ar re nammet
Testenn abEnnez a oa : Gant e Dad, an Dibec'hed

Gwerz ar Pantekost (Leksional , 2, paj. 25) a zo da vezañ lennet :
Deut, Spered Glan, Koulmig wenn,
Lakit warnomp da ziskenn
Ur bann eus ho sklêrijenn

Ar poz 3, eil linenn, lenn : D'an ene mignon tener

Ar pozioù 7 hag 8 o devije ezhomm da vezañ rimet gwelloc'h ivez.
Kanet e oa bet evel-se avat, hep an disterañ pleustradeg en a-raok, en
Bulien, war an ton latin anavezet gant meur a hini.

Un nebeudig fazioù ha gerioù tremenet a zo amañ hag ahan en testenn-
où, met aes-tre ez int da verzout ha da reizhañ.

Al Leksionaloù embannet betek-henn ne vezint ket mat er bloaz
a zeb, na zoken er bloaz war-lerc'h, peogwir e kemm an traou bep
bloaz e-pad tri bloaz da adkregiñ goude. Mat e vo " rezañjoù " ar
bloaz 1970 a-benn 1972 ha miret eo bet ar c'hlichedoù evel just, da
adtennañ ar pezh a vo ezhomm ; met gwelloc'h ganimp gwelout o vont
diouzhtu an holl skouerennoù manet c'hoazh, se 'zo sklaer, eget lezel
arc'hant da gousket evel-se.

An Aotrou Kerveadou, eskob Sant-Brieg ha Landreger en devoa
degaset ul lizher eus an hegaratañ ha meulus-tre, kerken ha resevet
al Leksional. Graet e oa bet fotokopioù eus e lizher da gas da holl
Eskibion Vreizh ha da renerien ar c'hannadigoù-eskopti. Mil bennozh
Doue dezhañ.

Merkomp amañ en deus respontet Eskopti Kemper ne c'hellent ket ober
bruderezh evit Leksionaloù Barr-Heol, war zigarez m'edont o
prientiñ ul labour heñvel.

A-benn bremañ e c'heller kaout e brezhoneg LEKSIONAL ar
bloaz 1970 evit ar Sulioù hag ar Gouelioù. Neuze Ritual ar
Vadeziant, Ritual ar Gouzoumenn, Ritual ar Bried-
elezh.

An ORDO EXSEQUIARUM (Ritual an Obidoù) n'eo
ket bet embannet e brezhoneg ; ha setu nevez-deuet er-maez ar
MISSALE ROMANUM latin, embannet gant Roma (17 x 24)
900 pajenn. Dambrest e tevio er-maez al LECTIIONARIUM latin,
e teir levrenn, ennañ an holl lennadenoù merket evit Kurunenn an
Amzerioù ha Kurunenn ar Sent.

Evit daou Sakramant dreist-holl ez eus poan evit abegoù hengounel ha
teologel o sevel testenoù : Kouzoumenn ha Nouenn.

Ritual ar Gouzoumenn kinniget gant Barr-Heol n'eo nemet
ar Ritual implijet betek-hen, da c'hortoz an hini nevez.

Labour a zo eta o c'hortoz youl vat ha kenlabour ar re na fell ket dezho
gwelout o yezh o tonet da vezañ danvez-folkloraj.

EM BANNADURIOU BARR-HEOL

1 Sulioù ar C'hoariz (Bloavezh B) ha Sul Fask	5 Lur
pa gemerer da nebeutañ 5 skouerenn	4,5 Lur
2 Leksional Sulioù ha Gouelioù ar Bloavezh B	8 Lur
pa gemerer da nebeutañ 5 skouerenn	7 Lur
3 Ritual ar Briedelezh (21 x 27) 50 paj.	5 Lur
pa gemerer da nebeutañ 5 skouerenn	4,5 Lur
4 Ritual Badeziant ar Vugale (liesskrivet)	1,5 Lur
pa gemerer da nebeutañ 10 skouerenn	1,25 Lur
5 Aviel Sant Lukaz (liesskrivet, mouladur kentañ)	5 Lur
6 Seurez Kerwenan (titloù ha skeudenoù gant an Timeur)	3 Lur
7 Mervel evit Bevañ (pezh-c'hoari gant Saig ar Go)	5 LUR
8 Otello diwar Shakespeare (titloù ha skeudenoù gant An Timeur)	5 Lur
9 Ofisoù ar C'hoariz	5 LUR
10 Ofisoù ar Pantekost	5 Lur
11 Ofisoù Pask	5 Lur
12 Lidoù ar Gonfirmasion e Kaouenneg 1970	2 Lur
13 Bloavezhioù kozh Barr - Heol, pep hini	15 Lur

Goulenn an holl levrioù digant :

BARR - HEOL, 22 - LANNUON

KOUMANANT da Varr - Heol :

Koumanant-bloaz : 15 LUR - K.R.P. 245 453 Roazhon (Rennes)

Ar goumanant a grog gant niverenn gentañ ar bloaz (Meurzh)

BARR - HEOL : Periodique inscrit à la Commission P.P.P.
sous le numéro 29 746

Tennet dre offset Copie 22 Péderneq

BARR HEOL war Feiz ha Breizh



DOUE
DIWALL VA BAG

BADEZANT AR VAG

TRESADENN GANT MEHEUT EVIT A GRALL

Niv. 35

MIZ Gwengolo

HON TAD hug a zo an Neiv hoc'h ano bezet san-te-loet Ho rouantezh deu-et dimp ha g'ho-ano bezet g'ho-

war an dou-ar e-vel an Neiv. Ro-it dimp hizio hon bara pen-de-ziek pardonit dimp hon pec'he-dou-e-ma ma pardonit

d'ar re a deus menket ouzhip ha n'h'al lezit ket da gouezhan en temptador met han di-wal-lit diouach an draug

Hon Tad hug a zo an Neiv hoc'h a-no bezet san-te-loet Ho rou-ant-e-lezh deu-et dimp ha po-

lan-tex be-zet graet war an dou-ar e-vel an Neiv. Ro-it hi-zio hon bara pen-de-ziek, pardonit dimp hon

pec'he-dou e-vel ma per-do-nomp d'ar re a deus menket ouzhip Ha n'h'al lezit ket da gouezhan en temptador

met han di-wal-lit diouach an draug SE-TU KOMZOU JEZUZ KRIST MEULEUDI DEOCH SALVER JEZUZ

E-CHU-IT HO LABOUR EN-HOMP, AO-TROU DOU-E DRE AN ILIZ SANTEL AR GWIR JE-RUZALEM NE-VEZ

